

DA GANAOUEN

ANN AOTROU MORVAN

DISKAN.



KEMPER,

MOULLET GANT AR. DE KERANGAL.

1872.

D'ALL LENNER.

N'em euz skrivet nag evid ober, nag evit klask lakat ober dismegans var ann Aotrou MORVAN.

Doan braz am euz var he sikour ; ma karje en dije great kement a vad ! ha brema, siouaz, e ma tec'het kuit !

Truez am euz ive ouz hoc'h ene ; da veur a hini, marteze, leor ann Aotrou-en devezo great kalz droug.

Hiroc'h va leor eget hini ann Aotrou ; ne ket souez.

Lavaret a zo buhan ; hiroc'h eo dislavaret.

Eun trouc'h a vez great d'ar red ; aliez ha pell e renker louzaoui evid her parea.

Em raok-me eo bet dislavaret ann Aotrou,



Église catholique
en Finistère

Document numérisé en 2019

ha guelloc'h, zo ken, evid na rin-me; evel ato e skrifann.

Pa vez sabezet dillad nevez, e renker torcha aliez. Ha goude beza torchet eur veach ha diou, e choum c'hoaz meur a strinkad.

Ha ne rafen nemet lamet eur pikad epken divar goustianz eul lenneur, n'em bezo ket kollet va labour ha va foan.

Ra blijjo gant Doue rei deoc'h sklerijen evid gullet freassoc'h ar virionez, ha caout muioc'h a zifizians euz all leoriou, a vez kaset deoc'h brema ker stang, evid klask mouga ho feiz ha trenka ho kreden!



DA GANAOUEN AN AOTROU MORVAN,

DISKAN.

Petra a zo a nevez e Lanniliz? Eno ez euz eun dourbill liou ha paper, a zo spountuz. Dizale, ma kendalc'h, er barrez-ze, e kouezo puilloc'h all-leoriou eget ar glao arne e kreiz miz even ha gouere. Anñ Aotrou Morvan he-unan, bete vrema ker sioul, a zo kroget ar goentr skriva enn-han; n'eo mui evid en em zerc'hel.

Goazet Lannilis, petra oc'h euz great d'ann Aotrou Morvan? Diskuez a ra he flemm; en em rodella, fiic'hal a ra evel an aer viber, a ve lammet eur goueskle euz he ginou. Klemm ha iudal a ra, evel eur c'hi a ve stardet striz eur vouaskel var he lost.

Hag ho peleien, petra ho deuz great d'ho mear koz? Diouc'h he glevet, eo eur zantik, a dorr he sec'het gant dour benniget hag he naoun o tebri sent; perac eta e teu hirio d'en em zifraoia evel eun erouant en eur pinsin? Petra! an Aotrou Abgrall, am euz anavezet reiz ha lent evel eun eizez; an Aotrou Sann,

komzeur bepret plean ha kompez; ann Aotrou Ugen, oanik Doue, a zo deuet da veza evel bleizi koz ha rouan, eur pechad mouèn var ho chouk? Livirit din freaz ha didroidel, ho peleien ho deuz roet skuer fall en ho farrez?

— Nan, nan, eme c'houi, ne moc'h ket gant-hi. N'euz c'hoarvezet, e Lannilis, netra oll a gement-se.

Abaoue m'eo klanvet ann Aotrou Morvan gant ar c'hoant da Baris, ne blije ket he arvesiou d'comp. Rag-se n'hor beuz ket hen hanvet da vont da Gemper. Er barrez, eun nebeut bloavesion a zo, e vez o c'hoari kas digas etre ti-kear hag he di. Bep ar mare, pa vez mouzet, e za er meaz euz ann ti-kear, dre ar prenest; ha kerkent e klask dont ebarz dre ar siminal. Eno en deuz en em zuet kalz goasoc'h eget oc'h en em dorchha ouc'h sae zu ar veleien.

Darn ac'hanomp, skuiz pelloc'h, a zo savet eur frouden en ho fenn d'hen teleur er meaz euz ann ti-kear. Aoun en deuz bet da veza tumpet; ar c'houden a zo bet kroget en he lerou. Ac'hano e teu ann abaden; abaoe eo trenket he valaden.

— M'oc'h entent, va mignoured. Lakit evez gouscoude! n'ouzoc'h ket petra eo klask tenna eun tamm amann a c'hinou eur c'hi? Keit a ma rit flourik d'he gein, ma roit eun tam lip-he-bao dezhan, a fich he lost, e ra cherantiz d'eoc'h. Kerkent a ma c'houlennit

lod outhan, avad, e tiskuez he zent hag e saill ganeoc'h. He gounnar a zo braz, he staon a zo du, he skilfou a zo lemm. Hen desket hoc'h euz divar ho koust, guelit e pe stuz oc'h lakeat! Sae ho peleien a zo diframet skrijuz; dont a ran da ober ennhi eur gri dreist penn biz, pe d'he fenseilla, ma vez red.

En ho foariou, en ho marc'hajou, hoc'h euz guelet aliez eun tenneur dent, eul louzaoueur oc'h pep klenved. Hennez a zo eur paotr, a oar dibuna geier, ha tenna guenneien a c'hodellou kement hini a zo diot avoalac'h da gredi anezhan. Ar veach kenta ma teu er vro, e vez ganthan eur garriolen ar re gaera, ha dillad ar re vraoa.

Bep ar mare, eun taol taboulin da zastum tud en dro d'he stâl. Pa vez bodet tud a leiz, e sao kempen en he za, e ra eur sell tro var dro, hag e tibun he *Oremus* evellenn :

« Tremenet euz bet dre amàn, marteze, »
 » tenneurien dent, louzaouerien vraz, var ho »
 » meno. Azennet kornok! Hini anezho n'eo »
 » bet, ne d'eo, ha ne vezo lur din-me. Eun »
 » dant kleuz ho peuz? Pignit amàn, bezit »
 » dienkrez; ne santoc'h ket, zo ken, eun »
 » tamen illik.

» Ho rastel a zo mad marteze? eur boan »
 » all bennag a ra diez deoc'h? Kemerit va »
 » louzou. Sellit, setu amàn eur vured. N'eo na »
 » braz na pounner, n'euz ket anezhi coulz »
 » lavaret. Houmàn ne ket diouc'h ar vent eo

» mont dezhi. Mad ! eur bugel deoc'h a zo
 » klanv gant ar prenvad ? eun diveraden
 » epken, a vougo ar goent mud. Tener eo ho
 » taoulagad ? Gant eur berad euz va louzou e
 » velfot guelloc'h eget eur c'haz, e kreiz ann
 » nôz. Brevet eo oc'h izili ? Efit eul loumad,
 » hag e m'oc'h ampart evel biscoaz.

» N'oc'h euz poan ebet ? Prenit va louzou,
 » ha birviquen ne grogo ennoc'h na droug-
 » sant, na drouk-skiant.

» Ha pegement ar vuredad, eme c'houi ?
 » Diegi ameus o lavaret deoc'h. Ne ket evid
 » arc'hant, evid netra eo e roan va labour ha
 » va louzou. Dek guennek tenna ann dant ;
 » pemp real ar vuredad !

« Eur suner arc'hant ! a lavaro, marteze,
 « unan bennag difiziuz en ho touez. Selaouit
 « mad, va zudou ! Ma n'em bije doan var ho
 « sikour, ha truez ouc'h ho poan, kredi a rit
 « e vijen diot avoalc'h evid tremen va buez
 « o raouennata bro, o samma riou, o tastum
 « va ankou ? Varc'hoaz e teuot d'am c'hlsak
 « ha n'em c'hafot ket. Guaz aze evidoc'h !

« Me, eur suner arc'hant, tudou ! arc'hant
 « a fell d'eoc'h ? Delit..... »

Ha kerkent eur vozad arc'hant e krab hag
 e bleo. — Ha kouer sebezet o tigeri he c'hi-
 nou. — Paour keaz ginaouek, e m'oc'h glu-
 det ! Evid eur guennek ho peuz tapet, e vezo
 goroet diganeoc'h eur pezh pevar real, pe
 zaou !

Mad, goazet Lannilis, p'am euz lennet leor
 aun Aotrou Morvan, e venne din gullet ha
 klevet eul lakipot evel-se.

Ann eil gueach ma teu ann teneur dent,
 ne bak mui nemeur a besked. Kalz tud a zo
 bet dizounet divar ann dro genta. Ann trede
 gueach ma teu er vro, e vez beac'h oc'h hen
 anaout. E leac'h eur garriolen ha dillad kaer,
 n'euz mui nemet eur skaoun gamm, ha truil-
 lou louz ; eur c'hi born en he gichen, eur
 c'hoillerad dent en dro d'ar c'houzouk.

Mad ! ann Aotrou Morvan, ker brudet bete
 vrema, a zo o vont d'en em labeza ma n'e
 gar diouall. Dizale, ma ne laka evez, e ma o
 vont da ober he dalarou e Lannilis.

*Eun taol balaen d'all leur, araok astenn all
 leuriad.*

Nec'het maro eo eun den. — Ma ne vez dial-
 bennet ann Aotrou Morvan, ha distroet he
 gomzou, lod a gredo n'euz abeg ebet da gaout
 en he lavariou, hag eo guir *Pater* kement a
 lavar ann Aotrou-ze anezàn he-unan hag euz
 ar veleien. Ar gaou, pa ne vez dislavaret
 abred, a deu buan da gemeret liou ar vi-
 rionez.

Diouc'h ann tu all, ma vez kavet abeg en
 he gomzou, ann Aotrou-ze a zo ker kizidik,
 ma teuo da benfolla. Iouc'hal a raio e m'eur
 adarre oc'h hen dua, oc'h hen dispenn. —

Blejal a rai evel eur vioc'h a ve kaset he leue d'ar c'higer.

Mez n'euz forz ! Ar virionez araok peb tra. Ha neuze, piou en deuz klasket trabaz ? Perak mont da flipata, ma en deuz aoun da baka eur flipad ? Perak strakal re he foued, ma n'en doa c'hoant da velet plega he douchen dezhan ? Nep a zo lemm beg he deod, a dle beza kaled korn he benn.

Ann Aotrou en deuz toulllet klaz ; palomp ann ero var he lerc'h. Hen en deuz digoret ann ant, deomp d'e bourchu, evid guelet peur n'eo ket eat eeun ann ero gantàn ; iou-c'hal so pe *zic'ha*, pa ia re a gleiz pe a zeou, ha, gant hor zeul, pa vezo red, kompezomp ar bomou troet fall ha diskompez ganthan.

*Pep den, koulz ha pep tra en deuz daou du ;
eun tu mad hag eun tu fall.*

Evel eur marc'hadour mezer, a oar brao he vicher, ann Aotrou Morvan a guz he du a enep, ha ne ziskuez nemet he du mad ; ha c'hoaz en deuz roet re a sked dezhan, en deuz her lakeat da luia muioc'h evid a zo red. — Mezer he amezok, avad, en deuz troet var ann tu a enep, hag, ouspen, en deuz he roufennet, goasa ma c'hell, evid rei dezhan doare fall.

Evel kouer troidelluz, pa vez o verza gui-

niz, ann Aotrou Morvan a laka ar pep braoa var c'horre, hag all lostennachou a zindan. Kaeroc'h a ra ! Evid sevel he varc'hadourez, e taol iver, duad ha grae e touez guiniz brao he amezok, e laka he palefarz e kichen ann hini en deuz labezet, hag e lavar d'ar preneur : « Sellit piz, emez-han ha livirit gant « piou e ma ar guella danvez. »

Kement-se, Aotrou, a zo divalo eun tamm ; etre beza leal, guirion, hag ober traou evel-se, ez euz kemm eun nebeut.

Nep en denz c'hoant da veza eün ha freaz, a dle lezel he dra gant pep hini, ha tra pep hini evel ma ema.

Deomp evel-se gant ann Aotrou Morvan ; selaouomp piz he ganaouen, ha greomp eun diskan da bep koublad.

KENTA KOUBLAD.

« En eleksionou diveza, evid mont da Gimper, « ar veleien ho deuz great kement varnon, m'am « beuz collet memes e parrez Lannilis, etc. » — (Page 1.)

DISKAN.

Mont da Gimper ! A be vro, divar be ouen eo ar brezounek-ze ? — Me laka, ar bre zounek-ma a zo bet ganet e kerne ha kaieret e Leon.

Roet em euz va demizion, eme ann Aotrou

Morvan. — Pebez brezounek saout ! Eur pagan en divije lavaret : Roet em euz va dilez — mez deomp buan. — Da genta, va den mad, ho peleien n'ho deuz lavaret ac'hanoc'h nemet ar pezh a ioa guir. Lavaret ho deuz e kavent ac'hanoc'h sammel avoalac'h, o ren-kout choum e Paris c'huec'h pe seiz miz er bloaz. Lavaret ho deuz ne gave ket dezho ho pije great atao labour vad ; ha, rag-se, e kavent guelloc'h kas eun all da Gemper en ho leac'h. M'ar deuz be kountet deoc'h, e lavare ar veleien traou all, ne dlijec'h ket beza kredet kement-se. Ac'hanoc'h-hu, Aotrou, euz bet lavaret d'ar veleien, goasoc'h eget paouez ; ha gousgoude, ho peleien ho kemere evid eun den onest hag eun den a zoare. Guelit eta e pe du ema ar garantez.

Araok mont var ar meaz, ar c'hañz a lemm he ivinou ouc'h ar vezen. Evid lakaat ar pesked da zireded, e vez plantet ann igen, penn dibenn er vuzugen. Evel-se, evid lounka guelloc'h fizianz ha kreden he genvroiz, ann Aotrou Morvan a lemm he zent e sae-zu ar veleien ; evid paka muioc'h a vouesiou, e ti-framm eur pechad euz ho losten, da staga a bouez he igen :

— « *Ar veleien ho deuz great kement var-non, eme c'houi.* »

—Ia, evid miret ouzoc'h da vont e gouezeri

ha da goll ; — ne ket evid ho tua, ho peuzi, ho kas d'ar goueled eo avad.

Dizale ez euz bloaz, ar veleien a ginnigaz deoc'h lakat hoc'h hano e strolliad ann trizek den a urz vad, a gaset da Baris. Tud all, tud a zoare, ha tud desket, a c'houlennaz ouzoc'h a rei a rajec'h ho ker da vont a du gant ar relijion. Braz e kavjot ann dra-ze ; beleien ha bourc'hisien a oe digoufiet ganeoc'h.

D'ar mare-ze, m'oar vad, ho poa dija great marc'had gant ar gostezen all.

Piou eta a droaz kein da genta ? ne ket c'houi eo ? Pa droec'h kein, petra raje ho peleien nemet trei ho zeuliu, glac'haret oll ho c'haloun ?

Neuze, avad, ar veleien n'oant ket eat a dre ho kein evid lavaret deoc'h freaz ar virionez : « Ma troit en tu-ze, » emez-ho, « n'omp ket evid mont var ho lerc'h ; ni a vezo a enep deoc'h. » Hoc'h-unan, aotrou keaz, ho peuz anzavet oa bet ar veleien didroidel. Araok mont da Baris, en eur rei ann dourn d'ann aotrou Abgral, e lavarec'h dezan ar c'homzouma : « N'oc'h euz ket roet ho mouez din ; « mignouned evel ato. Rag, ma-z-oc'h bet « em enep, hoc'h bet leal ha freaz, da viana. « Bezit dienkreiz, aotrou Persoun, n'ho pezo « ket leac'h da gaout keuz ma zàn da Baris ; « va mouez a vezo atao evid ar guir hag « ar feiz. »

Perak eta neuze lavaret eo eat ar veleien dre draiz deoc'h ?

Ar veleien ne gav ket dez-ho ho peffe dalc'het mad d'ho ker ; hag e lavaront d'ar re a c'houlén kuzul digant-ho, lakat evez, sellet piz ouc'h ho komzou hag oc'h oberou.

Petra ho peuz da lavaret var gement-se ?

— « Duet ho deuz ac'hanoc'h, » eme c'houi.

— Ne ket gant liou ha paper eo, da viana. C'houi eo, aotrou, el leor ho peuz sinet, da viz Gouere, hag en ho leor diveza, oc'h euz taolet ouc'h ar veleien liou druz ha sklabez.

Diouallit, aotrou, nep a lamm en eur poull anvœz, evid stlapa dour ouc'h ar re all, a deu er meaz lousoc'h peurvuia eget ar re en deuz klasket kaillara anezho.

— « Ar veach kenta oa din da goll, » eme c'houi.

— Ia, ia, aotrou ; an dra-ze a zao dreist pep tra d'ho kouzoug, a laka ho kaloun da eugi, ho tent da skrigna a enep ar veleien. Eno e ma ann dalc'h ! Anez, brema, koulz ha kentoc'h, ho pije en em c'hreat gant ar zae-zu, evel m'en em c'hra ar bara hag ann amann e kreiz ann domder.

— « C'hoant am euz da velet, » eme c'houi, « ha n'oc'h ket bet troumplet. »

— Guelit pebez eol skeduz eo ann aotrou-ze, ma sellit outan, e velit sklear ; ma troit kein e m'oc'h en denvalijen. C'hoant oc'h euz eta tud Lannilis, da c'houzout pe c'houi a zo lo-

riaden a spered, pe n'oc'h ket ? Ma votit evid ann aotrou Morvan, ho spered a zo sklear ha neat evel dour red ; ma votit evid eun all, oc'h dall pud ha ne velit berad.

— « Ne ket me epken, » eme ann aotrou Morvan, « trizek all, dre garantez evidon, « o deuz roet ho dilez. »

— Anezho ho unan ho deuz great kement-se, aotrou ? unan bennag marteze ; lod anezho n'ouzoun dare.

Me gred oant eat en ti-kear, var ho lerc'h-c'houi, evel eun torrad ier bian da bourchu ho mam. Pa zeo deuet ar iar goz er meaz, meur a labous, a dra-zur, a lamm kerkent dreist ann treuzou. Lod all a vije choumet ebarz, marteze, ma n'e divije ar iar goz klochet krènv ha galvet flour ? Var ar zizun, meur a hini anezho a skrabe ho fenn, hag a lavare evellen : « Marteze e vezomp tumpet ! m'hor bije guezet ! »

— « Ar gonselleurien goz a zo kenvroiz tud Lannilis, » eme c'houi.

— Hag ar re a ioa lakeat evid mont e leac'h ar re goz a deue kuit ep izom, a be vro int, m'ar plij, aotrou ? Job Kerandel, a Gerengal, ann aotrou Kerdrel, ann aotrou Lilez euz ar bourg, hag ann dek all, a zo divroidi e Lannilis ?

Ann Aotrou Kerdrel, kaset da Gemper en despet dezan, koulz lavaret, ne ket eun divroad eo, da viana. Meur a gant vloaz a zo, e ma ar famill-ze oc'h ober vad er barrez.

Guir eo, ann dud-ze ne reont ket evel-d-eoc'h choui. Ar re-ze ne lakont ket ar c'horn-boud da voudal, nag ann daboulin en dro, araok ober, pe da c'houde beza great eur vad ben-nag. Ne ket evid en em fougeal, ha plijoud d'ann dud, evid plijoud da Zoue eo e ra vad ar famill-ze. N'oa ket ac'hanoc'h, Aotrou; n'oa ket hano euz ho tud, e Lannilis, pa edo tad ha tad kôz ann Aotrou Kerdrel mear ar barrez.

Pegeit a zo, Aotrou Morvan, e ma ho tud-c'houi, o koza e Lannilis? Ho tad koz, pe ho tad kûn, n'int ket bet savet e touez bizin Guisseny? n'oa ket eur boned kelc'h-kar gantho? Kement-se, avad, ne ket eun disenor, nag evit-ho, nag evidoc'h.

— « Ar veleien, eme c'houi, ne reont nemet tremen. »

— Hir eo, da viana, ann ean a reont. Ar gureet peurvuia, a joum pemzek, c'huezek vloaz er barrez. Aliez ec'h anavezont tud ar barrez, dre ho hano hag ho lez-hano; aliez ec'h anavezont izommou ar barrisioniz koulz ha c'houi.

An Aotrou Abgrall en deuz sounj da vont euz ar prosptal da vered Lannilis. Petra reot ouспен, c'hui, Aotrou Morvan?

Evid guir, ar veleien n'e ma ket ho zud e Lannilis. Nan. Dilezet ho deuz ho zud honan, evid ober vad da dud all. Nag ho danvez ken nebeut. Tra, Aotrou. Peurlissa n'eo

ket braz ho leve; n'ouzont ket peleac'h e ma ho danvez. Er vicher-ze, ne zastumeur nemeur a venneien. Euz ann nebeud ho deuz, darn a ia e godel ar paour, ha lod euz ho dilec'h, e kef ar sant.

EIL KOUBLAD.

— « C'hoant am euz d'en em em venna, eme ann « Aotrou. »

DISKAN.

Ho peleien, ive, a garfe guelet ac'hanoc'h guenn kann. M'ar d'oc'h du, Aotrou, c'hui, oc'h unan, ho peuz laket ann duad. Keit a zo abaoue ar bizad kenta, ma ama interes bremaik. Lichaouit eta buan ha dizamant; kalz grouan, lichou tomm, ha kalz poan a renker da zispign evid guenna eur morian.

Gouscoude, pa rit kouez, soubit ar c'hrez, Aotrou; me a grogo en eur penn, a voasko guella ma hellin, hag a sello piz da velet pe seurt liou en deuz ann dour a deu dioutàn.

TREDE KOUBLAD.

« Affer ar bizin. »

DISKAN.

Guell a ze deoc'h, tud Lannilis, ma ho peuz

atao guir da vont da vizina var aod Landeda. Ne ket ho peleien a reio poan dez-ho kement-se. Paotred Landeda avad ne lavaran ket. Bete vrema, hag e pep leac'h, e kleven lavaret : Pep parrez var he aod. E Lannilis ne ket evel-se.

Beac'h a zo bet, gouscoude ; ann Aotrou Morvan en lavar. Ar Prefet, ann dud desket en dro dezàn, a laka ar guir gant tud Landeda. Ha gouscoude, e Kemper, me gred, ez euz difennerien guisiek, a oar all lezennou var an traou-ze. E Paris, en anzaio a rit, Aotrou, ne gavet na freaz na sklear ann traou. Var am euz klevet lavaret, ar varnerien vraz, a zo e penn ar rouantelez, ho deuz barnet evel ar Prefet, ha sarret, da genta, ho dor d'ann Aotrou Morvan. Skei en deuz renket eta var eun or uheloc'h. Lod a lavar en deuz renket mont betec ar voueden, evid pilat ar vezen ; ha n'en deuz gellet paka ar bouch-bihan, nemet dreist mouen ar gazez kôz.

N'euz forz. Gant ar Prefet, gant lod euz barnerien braz Paris, curé Landeda a gred e ma ar guir gant tud he barrez. Diskleria a ra he greden e ber gomzou ; mez en eur brezounnek koant, flour, ha nerzuz.

Bremaik ann Aotrou Morvan a lavare ar veleien a ioa tud estren, ne reont forz pe fall pe vad e zai an traou en ho farrez. Kuré Landeda, da viana, evid doare, a glask mad he barrisioniz. Ia ; mez ne ma ket a du gant

ann Aotrou Morvan, ha rag-se e pak eun taol dant.

Ha kerkent, eun taol pao d'an Aotrou Abgral.

Ann Aotrou Morvan, marteze, a ioa eat da c'houlen kuzul digant he bersoun. D'ar mareze, en distro a bep leac'h, ar mear a iea da ober eur bale d'ar prospital. Ann Aotrou Persoun en doa aoun na vije staget mizou braz ouc'h ar barrez, hag enkrez na golfe ar mear he brosez. Lavaret a ra dezan, eta, diouall, studia piz he gentel, ha diouall da vont re vuan, ha re hir, gant aoun na vije koustet ker dezan dont en dro.

M'en divije bet ann Aotrou-ma kollet neat he ribotaden, e vije kuezet he veud en he zourn ; neuze en divije bet goloet, ha livet kempen, ann ali fur ha karantezuz roet dezan gant he bersoun.

PEVARE KOUBLAD.

Rag-se, eme ann Aotrou « komzou beleien n'int ket ato guir evel ann Aviel. »

DISKAN.

Tra, Aotrou. C'boui a zo bet er skoliou braz, ha ne vouiec'h ket ann dra-ze c'hoaz ?

N'euz guir evel ann Aviel, nemet ann Aviel

he-unan, komzou Doue, ha kelennadurez ann Ilis a berz Doue. Komzou ar veleien n'int guir *Pater*, nemet pa rannont etre ar gristenien guirionesiou ann Aviel, ervez kelennadurez hor mam zantel ann Ilis. Er meaz ac'hano, eur belek, dreizan he-unan, a hell fazia, var draou ar bed, ha koll he ene, zo ken, eveldoc'h-hu.

Gortozit, Aotrou, m'en devezo ho map great be bask kenta, hag e tesko ann dra-ze deoc'h.

Araok lavaret he oferen, oc'h ober eur sell oue'h an amzer, eur belek a lavar d'ar c'hloc'her: « Hirio, emezan, me gred e vezo glao epad ann Deis. » Hogen, divar dek heur e sao ann amzer. Mar plij, Aotrou, petra ra-ze d'ar relijion?

Persoun Lannilis ne vouie ket pe gant eun alc'hoez pe gant enr morzol ho pije digoret ann or he deuz roet perz deoc'h e bizin Landeda. Ann dra-ze, Aotrou, ne vir ket n'a deo guir ann Aviel.

A drugare Doue, meur a hini, bet barnet ganeoc'h-hu da vervel, a zo hirio iac'h pesk ha beo buezek. Lod anezho a veillo ganeoc'h, pa viot var vaskoun, a daolo var ho pez eur banne dour benniget hag eun *De profundis* bennag. Kement-se, Aotrou, ne vir ket ousoc'h da veza eul louzaouer brudet, eun dreseur izili dreist, eun dispenneur kig dibab. En eur zistrei euz ar vered, onn dud-ze a lavaro :

Mad, setu eat ann Aotrou Morvan en hor raok. Eun den guizieek oa gousgoude ; mez ne ket gantan ema ar vuez.

PEMPED KOUPLAD.

« Affer ar podou livet gant Ploum. »

Eur ger pe zaou, araok diskana.

Poderien Lannilis, tud a galoun, tud a boan, na me, nag ho peleien ne garfemp ten-na ho para diganeoc'h, na pell diouc'h eno ; her gouzout a rit. Ma renkfec'h dispign eur guennek pe zaou muioc'h, evit liva pep pod, her guerzfec'h daou ha tri guennek keroc'h. Ar boderien all a renkfe ober eveldoc'h, ha ne verzfec'h na muioc'h na nebeutoc'h a bodou. Ne ket ousoc'h-hu, ouc'h ann Aotrou Morvan eo e komzan.

DISKAN.

Brema, va zudou, digorii ho tiskouarn ker braz ha diou bodez !

Meur a hini a zo bet klanvet, unan bennag a zo marvet ; ann Aotrou Morvan n'en nac'h ket. Mad ! e leac'h senti ha plega, hon doctor a ra ar pennok, a zesk he gentel, evit liva komzou brao d'ar Prefed ; hag ar podou a vez atao livet gant ploum.

Ha ma klànv, ha ma varv unan bennag, eme c'houi? Petra ra-ze? E Lannilis ez euz louzaouerien; ma varvit, e varfot evel ma renkeur mervel, bet eul louzaouer var ho tro. Ha neuze, galvit buan ar medisin, ha ne varfot ket. Poan a vezo, avad! ler a baeo; ar ialc'h a baeo ive! Neuze e kousto ouspen pemp guennek ho podez d'eoc'h.

Pa vez skrifellet, ann Aotrou en deuz illik, hag a zistak taoliou ru. Skrivet en deuz, d'ar gazeten a Gemper, eul lizer trenkoc'h eget leaz goueden, evit diskleria n'eo ket all livach ploum ken amjest evel ma levereur.

Gousgoude, Aotrou, c'hui, hoc'h-unan, ho peuz lavaret oa da ziuall. Ha neuze, ma ne ket noazuz ar ploum, perak ober kement-se a drouz evit netra?

O! ne ket diez gouzout. Goude beza lennet leor ann Aotrou Morvan, poderien Lannilis a dlle lavaret evellen: « Anez hennez n'hon « doa tam da zebri; m'ar da er meaz, e ielo « hor bara diganeomp! buan, eta, da gas hor « mouesiou dezàn. »

Pebez pesketour eo ann aotrou-ma! nemet e pako pesket, ne ra forz pe gant ann ors e vezo. Anter kant mouez muioc'h paket! an aotrou ne glaske nemet ann dra-ze. Kement-se, a gav din, aotrou, a zo ober eur fardel e kanol ho nessa, distrei andour divar he foennok, evit hen digas da zoura guelloc'h ho foennok oc'h unan.

CHOUËC'HVED KOUBLAD.

« E leac'h 40 skoed, ann Aotrou en deuz great « d'ar barrez rei 200 skoed evit prena louzou d'ar « beorien glànv. »

DISKAN.

A zo mad an dra-ze, Aotrou.

Euz ann arc'hant-ze, eme c'houi, n'euz kouezet diner toul ebet em godellou.

— Mad, keit a mad, ive! Mez ar veleien, a rit kement a fae varnezho, a ra kerkoulz a c'houi da uebeuta. Pa guez klànv ar paour, *hag e ve ho brasa enebour e ve*, e zeont d'he velet; hag, eleac'h goulén eun diner toul digantàn, e kasont dezan, ha d'he vugale, eur pezh guenn bennag bep tro. Ar veleien, divar dro Lannilis, ho deuz, meur a veach, paet c'houek medisinet evid mont da velet peorien glànv euz ho farrez.

SEIZVET KOUBLAD.

« Ranj great gant ar beorien. »

DISKAN.

Eno da viana, Aotrou, c'houi n'oc'h ket bet eur vegin. Ne ket c'houi ho peuz c'houezet ar mad-ze. N'oc'h ket nemet eur zoroc'hel, da

zigemeret ar c'houez lakeat ennoc'h gant ar re all. Euz a Gemper. euz a Baris eo bet kemennet deoc'h ober ann traou-ze. Ha neuze evit renka kempennoc'h ar beorien, evid lakat ann aluzennou da goueza puilloc'h, piou en deuz roet eun taol skoaz deoc'h ? Beleien ar barrez. *Tud estren*, eme c'houi-gouscoude e kemeront ho loden frank a beorien, ha ne ket ar veleien a vez guelet oc'h argila, pa deu an dervez da baca he c'houel Mikeal d'ar paour.

» — *E dek vloaz, eme c'houi, ez euz 60 paour nebeutoc'h e Lannilis.* »

— Ha ped, Aotrou Morvan, a zo eat da Vrest, pe da eur gear all, da frita ho naoun, da guzat ho dienez ?

Klevet a rit Meret ar c'heariou braz o klemm e teu peorien dezho a bep bro. Ne ket souez. Great e vez ann arz varnezh en ho farresiou ; red eo dezho tec'het ha mont da guzat en eunn tu bennag.

EIZVET KOUBLAD.

» Eun Ospital hag arrebeuri nevez evid repui ar « beorien goz. »

DISKAN.

Eun Ospital great gant piou ? gant arc'hant eun den trugarezuz, gant aluzennou tud ar

barrez ; ne ket gant arc'hant ar mear eo avad.

Gouscoude, ne ket abalamour d'ann Ospital, kredit mad, ez euz klasket ho teurel er meaz. Abalamour d'aun traou mad ze oll, em euz klevet, meur a veach, ho persoun oc'h en em veuli enz he veur koz.

Betec aze, gouscoude, n'euz ket kalz a dra da lavaret d'an Aotrou. Mez gortozomp eur eur begad ; el lost ema ar bilum.

» *Hini euz ar re goz ann Ospital, emezan, n'en deuz votet evidon.* »

— Penaoz ec'h ouzoc'h ann dra-ze, Aotrou ? C'houi a zo lemm avoalac'h ho lagad, evid galloud lenn a dreuz ar paper ?

O velet ac'hanoc'h o klask tec'het ken aliez euz an ti-kear, ar re goz keaz a gave dezho oac'h skuiz ; ho deuz bet truez ouzoc'h, ha klasket ho tisamma.

Gouzout a reant oac'h eur mear mad, petra ra-ze ? evid mont da Gemper eo e votet ? Eun den a hell beza arguella mear ha gouscoude eur c'hannad, pe, evel ma livirit, eun deputet truezus ha didalvez.

Ma em euz eur c'here mad, e zand'he gaout bep tro ma vez fall va boutou. Pa em euz izomm eur c'har nevez, e klaskan eur c'halvez, pe eur c'harreur. Ar c'here n'oar ober nemet bouteier mad ; eur c'har, great gantàn, ne ve nemet talfaset, ne ve na kre, na dres, na ploum.

NAVET KOUBLAD.

« Ne ket ar beorien a damallan, eme c'houi, all
« Leanez eo. »

DISKAN.

Delit adarre ! Petra eo, gouscoude, beza
tik losten, pe zu pe ven e c'helfe beza !

Diskuezet euz deoc'h, aotrou, all leanez e
doa digemeret ho paperiou evel paperiou ar
re all ; ha lezet ar beorien da ober evel ma
carent. M'en divije eur paour goulennet kuzul
digant-hi, marteze e divije roet ali da voti a
enep deoc'h. Petra o peuz da lavaret var ge-
ment-se ? C'houi oc'h euz aliet ho mevel hag
ho merourien da rei ho mouez da re all ?
N'oc'h ket bet e Gnisseny, hag e leac'h all
o rotal, o kesta mouesiou ?

— O, eme c'houi, ne ket ar veach kenta
d'all Leanez ober traou evel-se.

— Selaouit mad, tudou ! ema beg ar skou-
arn hag ar flemm o tifourcha ! Pa edoc'h
mear eta, Aotrou, e veze great d'al leanez
ober evel-se ? Setu petra eo skolia fall ar
merc'hed !

Me oc'h entent, Aotrou, n'oar den guelloc'h
petra e zo er geusturen, evid ann hini a zo
bet oc'h he ober.

Nep en deuz tomet ar iod, a oar guella pe
seurt a zo lakeat da frita.

DEGVED KOUBLAD.

« Inchou braz, e pevar c'horn ar barrez, eul leur
« gear, punsou, eun ti-kear. etc. etc. »

DISKAN.

Mad, ha brao dreist, Aotrou mear. Ha ped
diner toul, mar plij, ho peuz tennet euz ho
kodellou evid ober ann oll draou-ze ? « Hini
« ebet, eme c'houi ; ne ket evidon, evid ar bar-
« rez eo e labouren. » Hag a zo guir, Aotrou.
Hogen, neuze, perak rebech d'ar veleien ho
deuz prenet arreubeuri ar zâl divar goust ar
Zant ?

Epad m'oac'h mear, Aotrou, bep tro ma
vezec'h paet gant ho pratikou, rei a reac'h
lod d'ann ti-kear ? « One, guennek ebet ! »
Mad, Aotrou mear, ar veleien a labour evid ar
Zant, evid an Ilis. hag evit ar barrez. Bet oc'h
e konsail ann ilis, gouzout a rit eta, e pep
servich, e peb anteramant en deuz ar Zant he
lod da genta, hag all loden vrasa, zo ken.
Ma en deuz ar Zant eun tam gobr, eo o veza
malabour ar veleien da glask maladen dezàn ;
ma labouront da c'hounid dezàn peadra da
genderc'hel ann ilis, hag ar guiskamanchou
e ratre, da baea ar ch'loher, ar ganerien ; ha
souez eo, goude-ze, ho deffe ar veleien ho
bara hag ho lojeiz divar goust ar Zant ?

All loan, eme ar skritur, a dle beza maget

divar goust an hini ma labour evitàn. Arabad eo muzella all loan a zo o vaillad ed ; lezithen, eme ar skritur, da gemerct eur c'hinaouadik bep ann amzer.

C'houi, Aotrou, n'ho peuzket roet eul liard d'ann ti-kear. Oc'h espern, o sellet piz, ho peuz great ann traou kaer-ze. Da lavaret eo, n'ho peuz na flipet na teuzet, ep izomm, guenneien ann ti-kear. Da veza meulet oc'h var gement-se. Gouscoude arabat eo sevel ker sounn ho penn, ken uhel ho kar hag ho mouez evel eur c'hillok teilok. Ne ket brao en em veuli ann unan ! bezit izelloc'h a galoun, me ho ped. N'oc'h euz great nemet ho tener, ar pezh a' ra, hag a dle ober, pep mear mad hag onest en he Barrez.

— « *Ha perak neuze, eme c'houi, klask va zeurel er meaz ?* »

— Mez perak, c'houi, ez iit er meaz pa vez nebeuta ? Atao o vont hag o tont, evel eur paotrik gined ha douget d'he benn, a vouz aliez ouc'h he dam bara, o veza ma oar brao, ma ne c'hell kaout guelloc'h digant he vam, e choumo atao he dam bara hag amann ganthan.

Ha neuze, Aotrou, lavaret a reac'h ho kenvroiz a ioa bet troumplet ! Evid guir, a forz da fistoulad kalz, a forz da resti ar guden, oc'h eat en ti-kear adarre. Gouscoude, meur a kant euzho kenvroiz, ho deuz desket deoc'h e vouient brao petra a reant, ha discuezet de-

oc'he velent nebeutoc'h sklear en ho relijion, da c'houde eget araok m'ho poa skrivet all leorze trenk ha c'houero meurbed.

UNEGVED KOUBLAD.

» Afler ar prospital. »

DISKAN.

M'ar plij, Aotrou Morvan, he dra da bep hini, hag e ve d'ar Zant e ve. Arabat eo deoc'h klask paka enoriou divar he goust.

Ar zant en deuz prenet ar park, a zo ennan ar jardin hag ar prospital nevez. Dre aner, great gant tud ar barrez, ha gant arc'hant ar Zant, eo bet savet ar mogeriou. An ti-kear, ervez al lezen, a renk rei eun ti d'ar persoun. Eun Aotrou, a Lannilis, ne ket an Aotrou Morvan eo, a roaz ann ali da verza ann ti kôz, ha da lakat ann arc'hant da sevel ann ti nevez. Evelse e eo great ; ann ti-kear ne zispignaz ket eur guennek. Da biou eta eo dleour Lannizilis euz ar prospital nevez ? Da Zoue, d'ar Zant, ha dezho ho unan.

Ar Aotrou persoun, her gouzout a rit, en deuz harpet, keit ha ma belle, evid miret da brena ann arrebeuri, a laka ann dour da zont en ho kinou. C'houi hag ho mignoured eo [a heurte, hag a lavare e vije mez ganeoc'h guellet sal prospital Lannilis ken truillok hag hini Plougerné, en amzer ar persoun koz.

Gouzout a rit an diegi en doa ann Aotrou Abgral o tilezel he di kôz. Her chasa a zo renket, koulz lavaret, gant ar c'hrog. Ha piou a ioa o regi he zillad, evid hen tenna er meaz ? C'houi hag ho mignouned.

Hag oc'h divezet avoalc'h, evid rebech dezan eun dra great ganeoc'h en despet dezan ? Ann dra-ze, a gav din, a zo suilla ar virionez evid he flega evel ar gaou.

Ne ket diez, divalo braz eo avad, pa vez great droug, teurel ar beac'h var ar re all, ha lakat ar vaz da derri var ho chouk.

Evid piou, Aotrou, eo sal gaer ar prosptal ? Evid ho tigemeret, c'houi, ha nep a zo guisket evel doc'h. Evid piou eo gambr ann Eskop ? Evid ann Aotrou n'Escop, m'oar er vad. An traou-ze a zo d'ar Zant, hag a joumo gantàn. Pa varvo ar persoun, he heritourien a renko paea ann uz anezho.

Ar persoun a zo en he gambr, en he zillad he unan, en he arrebeuri dister. Greomp eun trok, ma kirit, Aotrou, etre arrebeuri ar persoun hag ho re c'houi.

— « Grit vad evid ann droug, » a lavar ann Aotrou, divar benn he bersoun.

— Mad, Aotrou, en despet da gement a leverfot, setu petra en deuz c'hoanteat ho persoun da ober deoc'h.

Pa ginnigit da eun den, en deuz enr gor

bilumuz, toulla ar gor evid ma tirento, avechou e vez rebarbet ouzoc'h, ha lavaret komzou dipituz deoc'h. C'houi ne rit van, eun taol canivet a roit, eun dever evidoc'h. Evel-se, pa en deuz guelet ac'hanoc'h o trei fall, diouc'h ma kaf dezàn, oa ann dever, evid ho persoun, klask mad he berrisioniz, mad oc'h ene c'houi, ha lavaret freaz deoc'h ar virionez, evit-hi da veza poaniuz dezan da lavaret, ha deoc'h-hu da glevet.

Her great en deuz ; ho troulanz en deuz ; ho troulanz en deuz bet, oc'h anaoudegez ne ket braz ; guaz evidoc'h.

« Mignouned oump bet, eme c'houi, keit a m'oan
« mear ha m'en eoa ar persoun izomm ac'hanon. »

— Evid ober muioc'h a vad er barrez, ar persoun a glask, guella ma hell, beza a unan gant he veur. Hogen m'ar deuz eur persoun en Eskopti, hag en deffe great pep tra, evid beza deuet mad gant ar mear, eo ann Aotrou Abgral eo, a dra-zur. Bete re hir, zo ken, eo bet eat.

Eur vam grac'h ha magn gant he bugel, a ra he oll lavariou out-hàn, he deuz keuz da c'houde-ze. Ar golladen, pa vez savet, a ra he benn he-unan, hag a laka he vam da vouela dourok. Setu histor anu Aotrou Abgrall hag e veur koz.

An Aotrou persoun en deuz guelet meur a

republik. Gouzout a ra, pa vez eun tam freuz, ar republicaned a skrab da baka ar c'hargou ha da zerc'hell peg ennhou, keit a ma hellont. Ar iouc'herien, neuze, a vez ar vistri, a ra all lezen. Ar re-ze, n'euz forz penaoz e vezont distaolet, a gouez atoo var ho z Reid evel ar c'hisier.

Deuet oa ar republik ; c'houi, Aotrou, ho poa en em ziskleriet republikan ; gouzout a rea e vije bet, eun tachad, ar voul ganeoc'h. M'en divije eta klasket he vad he unan arâok mad ar feiz, ar virionez hag ann urz vad, petra en doa da ober ? Tremen diouzoc'h-hu hag ho mignouned, beza deuet mad deoc'h. Var bouez kement-se, ho pije lavaret hirio, ez oa eur persoun fur ha santel.

DAOUZEGVED KOUBLAD.

« Skôl ar merc'hed tennet a douez an teil hag
« all loudouriez. »

DISKAN.

Eur garzaden hag eun taol balaen, a zo eun dra neat ha kempen.

— « Eun ti, eme c'houi, evid repui ar vugale
« vian. »

— Ha piou a dremen ho buez o skolia ar
vugale vian-ze, oc'h ho sevel, oc'h ho rinsa

eleac'h ho mamou paour ha reuzeudik ? All Leanezet, ho deuz dilezet peb tra evid all labour disaour-ze. Ha pe seurt pae ho deuz diganeoc'h-hu, Aotrou ? Eun taol kraban ha strinkajou pri ouc'h ho zae ven.

All Leanez a zo lent, a zoublo he fenn, a guzo he foan hag he daelou. En amzer-ma, ar reempl ha dinerz ne gavont nemeur dud d'ho difen. Scoit eta, Aotrou, scoit ; c'hoaz n'ho peuz leac'h da gaout aoun, den n'ho tialbenno.

Labeza eul Leanez ! Labeza eur vaouez ! Eun den desket, eun den a galoun evel doc'h, var ho meno, n'ho peuz ket a vez, Aotrou Morvan !

TRIZECVET KOUBLAB.

« Affer ar stread a benn ann tour. »

DISKAN.

Poaniuz, ne lavaran ket, pec'het a zo frank enn tamik. Ma vije gellet ober a c'hiz all, falloc'h e vije bet, aotrou ? Pa oc'h euz savet ho ti nevez, eaz ho pije kavet diskregi euz ho touar, evid ledanat ar riboul, a zo etre ho ti nevez hag ann ti e kichen ?

Ann Aotrou Calvez a ioa a vouenn ar re goz, leun a feiz hag a galoun. Doan en doa o lezel palad, ha bressad gant treid ar chatal,

douarou mesket gant ludu ar re varo. C'houi, Aotrou, ne ra netra kement-se deoc'h? Pa zeo deuet er barrez, evid miret ouc'h re a zroulanz, ann Aotrou Persoun brema n'en deuz ket rebarbet.

Hag ann dra-ma, ive, a zo eur rebech evitân? Penaoz eta, Aotrou keaz, galloud plijoud deoc'h-c'houi?

— « Diou abaden e 12 vloaz, » a gayân frank, eme c'houi. »

— Ha piou a zo bet penn abeg? ar veleien, na petra eta? var a lavar ann Aotrou.

Ra blijio gant Doue, Aotrou, n'ho pezo birviken aliesoc'h na goassoc'h abaden en ho tiegez! ha ma ne ro ar re a zo en dro deoc'h, muioc'h a abeg deoc'h evid ar veleien, n'ho pezo ket izomm da glemm.

PEVARZEGVED KOUPLAD.

« Ar veleien, ho micher lakat ar peoc'h da ren, a c'houez ann tân evel eur vegin, etc. »

DISKAN.

Ma ve kredet ann Aotrou Morvan, he vuzellou a ve anter deuzet gant ar c'hôr euz he garantez; kaloun ar veleien avad, a ve du, seac'h ha skarnilet gant ar gounnar hag ann dioul fall. Evel ar pezh a c'halver em bro me

eur zantik kolo kerc'h, goude beza kroazet he zivrec'h, astennet he vourrou, hir a moan evel beg eur minouc'h, hon Aotrou a guz he zaoulagad gant he zaou-zourn, a harp he benn ouz ar c'hae, hag a ra ann neuz da hirvoudi. Savit ho penn, me ho ped, Aotrou, ne m'oc'h ket o vont da goueza; pell a zo ne semplit ket bep gaou a livit.

— « Ar veleien a c'houez evel eur vegin, eme c'houi. »

— Ia, Aotrou, evid laza ann eulfennou tan a daolit, c'houi, a beladennou, var ar c'holo seac'h. C'houi a blant ive c'houez en ho pegin, keit a ma c'hell all ler digemeret, mez evid lakat ann tan guall da gregi eo. Rag, petra rit nemet c'houeza ann tan, o fistoula, bep tro ma vez eur garg bennag da baka, eun toul bennag da stanka; o vont er meaz euz ann ti-kear, evid ar blijadur en em fourra ebarz adarre, ha bep tro, evid spega moueziou, oc'h ada er vro hag e pevar c'horn ar barrez, ar c'hoz leoriou bian-ze, trempet a eol-douar hag a vin-ardant, hag e pere e livirit euz ar veleien pep tra nemet mad?

Eur c'hrouadur iud ha dinatur, kerkent a m'en deuz great eun droug bennag, a red da gaout he dad evid tamall he vreudeur, n'ho deuz great netra, nemet klask miret outhan da ober ann droug en deuz great. Evel-se, goude beza c'houezet ann tan guall, ann Aotrou Morvan en em denn a gostez, evid

sellet ouc'h ann ti o tevi. Pa deu ar veleien hag ann dud vad da laza ann tan, da freuza lod euz ann doen, da lakat eur penn euz ann ti da goueza en he boull, evid miret na vezo devet kement-zo, ann Aotrou-ma, gant eur vouez glac'haruz, en em glemm outho evel-len : « Petra rit aze, tud didalvez, emezàn, ho micher eo laza ann tan, hag e plantit c'houez ennhàn ! Dre mac'h ojit ar c'holo, dre ma freuzit ann doen, goasoc'h goasa e red ann tan ! »

O fluden ! o klufan ! o teod aspik !

PEMZEGVED KOUBLAD.

« Ar veleien a laka ann anter euz ar barrez da sevel a enep ann anter all. »

DISKAN.

Da biou, Aotrou, e root ann dra-ze da gredi ? Peleac'h e ma ann tad a glask lakat ar freuz hag ann trouz etre he vugale ? C'houi a gaffe ho plijadur o lakat ho kerent, ho tud, d'en em zrailla ?

Nep a gav he vad en droug, Aotrou, he r gra peurvuia ; nep a vez guaz euz ann droug, avad, a stourm, c'houeka ma hell, evid miret outhàn da c'hoarvezoud.

Goude beza great eun tam freuz, c'houi a

c'hell en em denna er meaz, evid diazeza ann enoriou oc'h euz tapet. Ha ma kavit re bounner ar garg, e roit ho tilez. Ar veleien ne hellont ket rei ho dilez, pa geront. M'ar bez freuz, hi a zo e kreiz, hag a vezo goasket. Ho mad ho-unan, mad ann eneou, a joum a zistribill ouc'h pep tam skrab a vez. Ar gos-tezen a enep ar veleien, a sello a dreuz outho, a vezo atao oc'h egas anezho ! Ha pa renko ar beleg klask ober vad da ene ann dud-ze, prezeg dez-ho, kaout a ra deoc'h, Aotrou, e vezint e tres da selaou kaer he gomzou ?

« *Ar veleien a glask lakat freuz !* » Koulz e ve deoc'h lavaret e vent diot avoalc'h evid lakat eun dourn e ginou eun durkez, ha goaska gant eun dourn all. Sul vui e voasko ann dourn deou, sul vui, Aotrou keaz, e vezo flastret ann dourn kleiz !

CHOUZEGVED KOUBLAD.

« Ma ne vezit a unan gant ar veleien, e leveront n'ho peuz na feiz na relijion. »

DISKAN.

M'ho pige lennet pisoc'h ann Aviel, ho pije klevet hor Zalver o lavaret d'he ebstel : « Nep ho selaou am zelaou, nep ho tisprij am disprij. »

Hag e kafe d'ar veleien e ve mad ober a c'hiz all, ne ket difennet ouzoc'h-hu, nag ouc'h mear ebet, kredi e ve guelloc'h ober eun hent en tu-hont euz ar barrez, eur puns er penn-ma euz ar bourg. Ar pezh a zo fall, avad, eo labeza sae ar veleien, ober, ha lakat ar re all da ober dismegans var ho c'harg, ha var ho c'haracter.

Pa vezo savet uhel banden bragez ho map ena, ma ra goap ac'hanoc'h, ha fae var ho komzou, ma kranch en ho pizach, ma taol pri ouc'h ho pleo guenn, kaout a rai deoc'h e vezo eur map sentuz, mad ha karantezuz ? Ar Zent, ar gristenien vad, ha c'houi a lavar beza unan anezho, ho deuz, abalamour da Zoue, muioc'h a zoujans evid ar veleien, me-yellou da Jesus.

« — *Ar veleien, eme c'houi, a lavar n'int
« ket evid fazia.* »

— En hano Doue, Aotrou, peleac'h ema ar beleg en-deuz lavaret kement-se deoc'h ? C'hoaz eur veach, n'euz difazi nemet Doue hag ann Ilis, hon Tad Santel ar Pab, pa zesk d'ar gristenien guirionesiou ar relijion, da lavaret eo, petra renker da gredi ha da ober evid mont d'ar baradoz. Ha c'hoaz, ne ket dreizhan he unan eo ar Pab difazi. Doue a harp anezhan, a vir outhan da fazia, var ann traou-ze, evid miret ouc'h ar virionez da

vont da goll. Er meaz ac'hano, n'euz den difazi. C'houi, gousgoude, marteze, a forz d'en em boumpadi, a gredo dizale ho pezo ar gal-loud da sevel ken uhel en ear, ma c'helfot ober divar nij evel all labouset all.

SEITEGVED KOUBLAD.

« Ar veleien a zo bet kaoz d'ann Aotrou Keratry
« da veza hanvet. »

DISKAN.

Pemzek rouden izeloc'h e livirit ann Aotrou Keratry a oe hanvet en *despet* d'ar veleien. Klevit mad, tudou, ha lakit ann daou dra-ze d'en em glevet, m'ar gellit. Hanvet gantho, hag hanvet en despet dezho ! Penaoz en em drouc'ha evel-se ? A, siouas ! ar re a lenne all leor-ze d'ar red, ne sellent ket ker piz outhan, ha, gant ma vije drellet daoulagad he genvroiz epad daou pe dri dervez, ken he divije roet ho mouesiou dezann, petra ra-ze d'ann Aotrou Morvan ?

Ar veleien a gaseaz ann Aotrou Conseil o veza m'en doa votet a enep ar Pab. Ann Aotrou Conseil, izomm dezhan a vouez ar veleien, a ia da Gemper da lavaret en deuz keuz, ha ne rai mui. Goulenn a ra eur rouden evid diskuez en deuz anavezet he faot. Ar

veleien, gousgoude, ne fiziont nemet eun nebeud ; hag, an dro genta, e roont ho mouez d'ann Aotrou Kersaouzon. Ar veared, avad, a ioa oll, koulz lavaret, evid ann Aotrou Konseil. Rag-se e oent kavatal, freuz taol a oe.

Neuze, eun trede klaskeur, trouz ganthan, a ziskuez he benn. Ann Aotrou Keratry oa. Ar veleien, lemm ho lagad, a lavaraz : Diouallomp mad ! Ann Aotrou Conseil ne blij ket deomp, mez ar veared a zo a unan ganthan. Ma fuillomp hor mouesiou, lod en tu ma, lod en tu-hont, ann Aotrou Keratry a labour kement, ma c'helfe beza da genta. Ar seurt tud-ze, evel eur zilien, en em ruz dre ar riboul voanna, hag e ve dre doul ann alc'hoez e ve. Evid miret ouc'h eur c'holl braz, greomp eur c'holl bianoc'h.

Ma ve red deoc'h dibaba etre koll dek mil lur ha koll dek guennek, penaoz e rafec'h, c'houi, Aotrou Morvan ?

Mez mar doa kerkoulz ann Aotrou Conseil, ha ker fall ann Aotrou Keratry, perak n'ho peuz ket labourer kaeroc'h evid kas ann Aotrou Conseil d'ar Gambr ? Ho mignouned a labourer c'houek evid ann Aotrou Keratry. Euz a vourg Lannilis, var a glevan, e oe kaset neuze kalz liziri da lavaret voti evid Keratry. Ann Aotrou Morvan en doa nevez bet ar groaz a enor digant Napoleon ! Kredi a reat, marteze, an dra-ze en divije roet

abaster dezhan, da c'hortoz ma vije lakeat gant ar c'houarnamant e leac'h ann Aotrou Conseil.

Siouaz ! da vare ann eil voterez, ann Aotrou Morvan a ro he zilez a veard. Ar vadelez ho pefe, Aotrou, da lavaret deomp perak oc'h bet mouzet neuze ouc'h ann ti-kear hag ouc'h ar c'houarnamant ? Red eo, avad, diskleria freaz ann traou ; arabat eo liva ar virionez gant ploum

TRIVEC'HVED KOUBLAD.

« Ar veleien a lavare o voti *nan*, evid ar Plebiscit,
« e votet an disurz. »

DISKAN.

Gaou ho deuz lavaret, Aotrou ? Ker buanze ho peuz ankounac'heat ar freuz a zo bet hag a zo c'hoaz en yro ? Ar veleien neuze ne drabasent ket kalz. Ne blije ket dezho Napoleon bet penn-abeg a gement a zo c'hoarvezet e Rom. Ne ket dre garantez evithan, evid miret ouc'h goasoc'h meur a hini a votaz ia. Guelet hon euz sklear ne ket rag ho skeud o doa aoun ar re-ze. — Ki skaotet, Aotrou, en deuz aoun rag dour klouar.

NAONTEGVED KOUBLAD.

« O voti ia, eme ann doctor, e roec'h d'ann
« Impalaer ar guir da ober brezel euz he benn he
« unan, ep konsulti den. »

DISKAN.

Pebez gaou, Aotrou Keaz ! E miz gouere
1870, ar Gambr a votaz ar brezel hag ar mi-
zou evid en ober. Er bloaz 1865, ann Aotrou
Thiers a lavare da Napoleon evellen : « Falla
tra a oufec'h da ober evid ar Frans, eo lezel
ann Itali da ober ar pez a ra e Roum, hag a
enep ar Pab. Ar Prus, emezhan, a zavo ive
c'hoant kreski ganthi, ha ni, siouaz, a vezo e
guask. » Re vir en deuz lavaret. Ar Prus eta e
divije klasket trabaz ouzomp abred pe zive-
zad. Ar c'houarnamant a zo da veza tamallet
o veza lezet laerez ar Pab, hag o veza n'oa
ket prest da vrezellekaat.

Gousgoude pemp bloaz bennag a zo ann
hini a ioa e penn ar zoudarded en doa
c'hoant da zeski ar *c'hard mobil*. Ma vije bet
selaouet, e leac'h beza flastret hon dije mar-
teze bruzunet ar Prus. Mad ! piou en deuz
miret deski ann dud iaouank ? Ar republi-
caned a ioa er Gambr neuze, hag ho deuz
great ar republik varlene. Ar re-zé neuze,
pa lavaret dezho. diouall ouc'h ar Prus, a
garnache, a iouc'he a bouez penn, a lavare

ar Fransisien a zo soudarded vad koulz lava-
ret en eur zont var ann douar, a oar brezel-
lekaat ep deski evel ma oar eun ouad bian
neun kerkent a ma teu euz he glosen.
Abaoue eo stanket ho ginou, ha desket deomp
divar hor c'houst, evid ober mad eur vicher
eo red beza he desket araok.

UGENDVED KOUBLAD.

« Ar veleien, eme ann Aotrou, ne deont ket d'ar
brezel, ni hag hor bugale eo a renk bale. »

Ho pugale c'houi, Aotrou ? Me gave din
ho map ena ne vouie ket c'hoaz guiska he
zillad he unan ?

Ha c'houi, peur ha ped gueach oc'h bet en
tan ?

Varlene, pa zoa kement izomm medisin
guiziek da drec'hi izili brevet, da louzaoui
soudarded mac'hagnet, pelec'h edoc'h
c'houi ? E Lannilis, er goudor, o klask ann
tu da vont d'ar Gambr, pa vije torret ar gor-
yenten ha tremenet ar bar amzer. N'em euz
ket clevet evijec'h bet oc'hen em ginnik da vont
d'ar brezel. Kalz bcleien, e tro hag en oad,
pevar-ugent, da nebeuta, ho deuz goulennet
mont ; all liziri skrifet gantho a zo c'hoaz en
eskopti.

Guir eo ar veleien ne deont ket d'ar brezel

evid laza tud all. Mont a reont avad evid sacramanti ar re glany, entent ouc'h ene ha korf ar re a vez diskaret, hag evid beza lazet ho-unan avechou.

Ma ne da ket muioc'h a veleien d'an tan, piou a vir ? C'houi hag ho mignoured. Ann Aotrou Keratry a oe renket lakat ar meud dezhan, evid lezel pemp beleg da vont da heul an dud iaouank diazez a gaset da loueda da Gonli. Eur beleg epken a ioa avoalac'h emezhan. Ar re-ze n'int ket safaret kalz gant eneou ar zoudardet.

Meur a vloaz a zo, Aotrou, varlene, dreist oll, an Eskibien, an dud a feiz, ar gazetennou katolik a c'houlenne ma vije kemeret eur beleg da viana e pep rejimant. M'ar deuz re a vizou, emezho, ni a savo arc'hant, hag ho bevo divar hor c'houst.

Respountet eo dezho ne vije ket kemeret muioc'h a veleien.

Petra rajent ken, Aotrou Morvan ?

G'houi a zo ollgalloudek brema, deuit a benn da gaout eul lezen evit rei eur beleg da bep rejimant, hag antronoz, e vezo dek beleg e leac'h unan oc'h en em ginnik da vont d'ar brezel.

Var vor, meur a vloaz a zo, e vez kemeret beleien. Goulennit ouc'h ann hini a zo e penn ann traou-ze e Paris, ha ne deuz ket kals muioc'h oc'h en em ginnik evid na heller da gemeret.

Euz a escopti Kemper, ez oa daouzek beleg er brezel. Ann Aotrou Saout hag ann Aotrou Hens a ioa e Sedan. Ann Aotrou Lucas, ann Aotrou Biorin e fortchou Paris. Ann Aotrou Jaffres, ann Aotrou Cleac'h, ann Aotrou du Marhallac'h a ioa gant ar mobiled, adalek ar penn kenta betek ar penn diveza. Ann aotrou du Marhallac'h, vikel braz, den dorret gant ar gozni, a zo bet toullet he dok a roget he zae-zu gant ann tennou. Evid ann dra-ze en deuz bet ar groz a enor. C'houi, Aotrou, m'am euz souch mad, n'oc'h ket bet o klask ho kroaz var ann dachen vrezel.

Ar vikel braz n'en deuz ket aoun rag ann tennou fuzul. Ann enoriou avad hen laka da grena. Hanvet oa bet da vont d'ar gambr, ep gouzout dezhan. Roet en deuz he zilez. An Aotrou Morvan a zo eat buan en he leac'h. Er gambr, peurvuia, ne vez ket roget all livet gant ann tennou fuzul. Henoriou braz a zo avad, hag ar goumanant a zo kempenn avoalc'h ive. Ne ket guir, Aotrou Morvan ?

E Konli euz bet pemp beleg euz ann escopti. Ann Aotrou Guiziou, ann Aotrou Lozac'h, ann Aotrou Gall, ann Aotrou Gillard, ann Aotrou Goavec.

Ann diveza a zo bet lazeta. Unan var bemp. Ne ket fall Aotrou. N'euz ket pell oa digaset he relegou da vered Castel. Castel n'ema ket pell diouc'h Lannilis. Ha n'oc'h euz ket klevet hano ebet a gement-se, Aotrou ?

Guir eo, tad an aotrou Goavec n'oa nemet eur micherour keaz, o c'hounit he vara divar bouez he zivrec'h. N'oa na bourc'hiz, na republikan, nemet tad eur belek n'oa ken.

Bete vrema, tud Lannilis, e cave deoc'h, marteze, oa ken enorabl kaout eur map belek evel eur map medisin, louzaouer ann ene evel louzaouer ar c'horf; ar republik, evid doare, a chench ann traou. Var a lavar ann aotrou Morvan euz ar veleien, hiviziken, pa ielo eur map deoc'h da velek, e tlefec'h gouela ken dourok evel pa zafe d'ar galeou.

— « Ar veleien a joum er gear, eme ann aotrou. »

Hag ho breudeur, ho c'herent, ho mignouned? Ar gloareget, a rit goap anezho, ho doa breudeur, kendirvi en tan. An aotrou Kerandel, a Gerengal, en doa tri breur er brezel. Ha pelec'h e ma ar belek iaouank n'en d'oa ket unan bennag, kar tost dezhan?

Ar re-ze, aotrou, a gav deoc'h, a ioa neuze gae ha laouen? Kridi a rit e kanent c'hoael hir d'ar brezel ha d'ar Republik?

Ha pa n'ho divije den er brezel, aotrou, kaout a ra deoc'h ar veleien n'ho deuz ket a zoan var sikour ho nessa?

C'houi, evid doare, a zo evel eun den pinvidik am euz klevet hano anezan : pa vije leun he gof, n'oa ket evid kredi ho divije naoun ar re all. Varnez ho klevet, eta neuze,

c'houi, gant ma choumoc'h er gear, ne rit forz piou a ielo d'ann tan, euz ho ti pe euz ho parrez? M'ar deo great ho kaloun gant dir, guaz evidoe'h. M'ar deo ker ber-ze ho muzul. aotrou, o varn ar veleien diouzoc'h oc'h unan, ne tizoc'h morse nag ann hirder nag all le dander euz ho c'harantez evid ho nessa.

— « Ar veleien, « eme c'houi, » a zo troet avoalc'h « ouc'h ar brezel. »

— A sa, Aotrou, troet eo ho spered e dour? Ar rouanteleziou all a vusc'hoarze o velet ar Frans e beac'h hag e goask. Euz a gement roue a zo er bed, n'euz bet nemet ar Pab euz a Roum, o skrifa da rōue ar Prus, da lavaret dezàn eana ann emgann, hag ober kempenn ouc'h ar Frans. Goulennit digant ar Mear braz euz hor bro ha ne ket guir kement-se.

KENTA KOUBLAD VAR-N-UGENT.

« Affer ar gloareget. »

DISKAN.

Ar Seminer a ioa leun a zoudarded. Ar gloareget ho deuz renket choum er gear, c'houeac'h pe seiz miz. Ann Aotrou n'Eskop a ginnigaz d'ar prefet kloareget kement a ma karje evid entent ouc'h ar zoudarded klanv.

Ann Aotrou Cameasca, mignoun d'ann Aotrou Morvan, n'eo ket dianaoudek evel ann doctor. Trugarekaat a reaz ann Eskop, ha meuli kaer kaloun vad ar gloareget.

«— Daou gloarek Lannilis, eme ann Aotrou Morvan, a ioa dindan guz epad ar brezel.»

— Pennou tiegez Lannitis, en hano Doue, e bern kolo pehini ac'hanoc'h, e sanail piou eo bet kuzet ann daou cloarek keaz-ze ?

Daoust hag ann Aotrou Morvan, gant he spount, a ve bet eat neuze da guzat en he c'halatez, ha ken trubillet, ne grede ket zo ken sellet er meaz dre he brenest ? Anez en dije ho guelet, meur a veach er zizun, o tremen a biou he di. N'euz hini a vugale ar skol ha n'en deffe guelet, n'ouzoun ket ped gueach, ann daou gloarek o vont pe o tont euz ho c'hear d'ar bourg hag euz ar bourg d'ho c'hear. Bep sul e vezent en oferen bred; ann Aotrou Morvan, ma n'en deuz ket ho guelet, pa zea d'ann ilis, ne gase ket he zaoulagad da zul ganthan evid doare.

Eur gerik deoc'h-c'houi brema, Aotrou, m'ar plij ganeoc'h.

Varlene, ann Aotrou Gambetta, eur republikan braz, m'ar deuz bet biskoaz, tri miz da c'houde m'oa sklear ne hellemp ket harpa, pa zeo guir n'hon doa na soudarded desket,

nag armou, a gendalc'he da sevel tud, da gas anezho d'ar gigerez; da lakat goad da ruil, da zispign arc'hant a vergnou. Hennez a lavare e renket ober brezel ken a vije kouezet ar zoudard diveza ouc'h torgen.

Ne felle ket dezhan selaou he gonsortet euz a Baris; red e oe he sparla. Ann den-ze, galvet gant ann Aotrou Thiers eun antereget hag eun anter-gounnaret, en deuz lakeat ar vro da goll kement a dud, ha da zispign, ep vad ebet, daou pe dri milliar, da lavaret eo, ann daou fars euz ar pezh a zo renket rei d'ar Prus.

Mad, tudou, hennez eo ar pabor e touez ar republikaned.

Konseillerien Kemper, o velet ober kement a freuz evid netra, a glaskaz rebarbi. Ker-kent oent darchoet d'ann traon. Ouc'h ann nerz n'euz ket a enep; dont a renkjont er meaz. Skrifa a rejont avad evid reklem, ha diskleria e zoa a enep pep guir ar pezh a reat. Daou pe dri ne aotrejont ket sina all lizer; republikaned oant, hag ann Aotrou Morvan a oe unan anezho. Ar bleiz a ioa var ar zaout, edo ar mare da harzal, Aotrou. Penaoz ! den mui da zifen guir ann departamant, ar pennou avelde-ze oc'h ober ar pezh a garent, ha c'houi ne lavarec'h grik ! Peleac'h oa eat ho teod neuze, Aotrou Morvan ?

Harzal ouc'h all leanezet, ar gloareged iaouank a zo eaz, ar re-ze ne zistroont ket

ouzoc'h. Ann Aotrou Gambetta, d'ar mare-ze a ioa baz en he zourn hag a ziskueze he zent; evel-se oc'h bet choumet sioul, didrouz ha lostok. Evel-se ive brema, n'euz nemet evi-doc'h hag ar republikaned.

AFFER HON TAD SANTEL AR PAB.

KENTA KOUBLAD.

« Ann Otrich hag ar Spagn a za broiou ker kato-lik ha ni ; ha gousgoude ne velit ket anezho oc'h
« en em daoler er beac'h evid hon Tad Santel ar
« Pab. »

DISKAN.

Ann Otrich, m'ar plij, Aotrou, a zifenne lod euz a zouarou ann ilis, betek ann dervez m'eo bet taolet er meaz gant Napoleon. Ar Spagn he deuz kinniget d'ann Impalaer en em garga, hi he-unan, da zifen douarou Sant Per. Ann Impalaer ne aotreaz ket. Rag neuze n'en divije ket gellet rei tro da Victor Emmanuel, he goumper, da fripa douarou ann Ilis.

Ma teufe daou zen karantezuz da ginnik da eur beachour, kalz arc'hant ganta, mont d'he ambroug eur pennad ; eul laer, c'hoant dezhan da ober he dro, a lavarfe dezho evellen :
« Choumit er gear, va zud mad, me a ielo gant ann den-ma, armet mad ounn, hen difen

a rin. » Siouaz, eat eur pennad, den var dro, all laer n'en deuz ket a boan o tisamma ar beachour keaz. Setu petra en deuz respountet Napoleon d'ar Spagn ; setu petra en deuz great ha lezet ober d'ar Pab !

EIL KOUBLAD.

« He-man a vezo hir enn tamik ; c'hoant am euz
« da rei deoc'h sklear da goumpren, penaoz eo
« c'hoarvezet ann traou e Roum. »

DISKAN.

Er vro ma edo, betek nebeud a zo, ar roue Victor Emmanuel ez euz bet a viskoaz, evid doare, tud dare da gregi, hir ha kam ho bizied, ha peg ouc'h ho daouarn. Rag, unnek pe zaouzek kant vloaz a zo, tud ar vro-ze, difeiz ha diskramail, a iea bep ar mare varzu Roum, da freuza, da zevi, da laerez ha da vuntri. Bep tro ma zeant, ar gristenien geiz a veze bres varnezho, ha truezuz braz ho doare. Ar Pab a renke choum, pell avechou, ep galloud skrifa da gristenien ar broiou diaveaz, na klevet kelou ebet anezho. Ar pezh a ioa doaniuz evithan, ha noazuz meurbet d'ann Ilis.

Mil bloaz a zo, eur roue a Frans, a zistoupaz ar bobl dinatur-ze hag a roaz d'ann Ilis eun nebeud douarou en dro d'ar gear a Roum. Abaoue ar mil bloaz-ze eta ar Pab, e douarou

Sant Per, a ioa en he dra gant kement a vir, da nebeuta, evel ann Aotrou Morvan en he di nevez hag e leveou he dud koz.

Selaouit brema, tudou, penaoz eo bet laeret, a nevez zo, douarou ann Ilis.

Eur c'horn douar euz ann Itali a ioa, abaoe eun tachad amzer, etre daouarn ann Otrich.

Daouzek vloaz a zo, ar Frans, divar he c'houst, a ieaz da gas ann Otrichianed er meaz. Eno e oe kollet anter kant mil den, ha teuzet tri c'hant milion.

Gousgoude, evid ar brezel-ze, bet kiriek d'hor bro a gement a goll, ar republikaned a strake ho daouarn hag a zride ho c'haloun.

An douar kemeret gant ar Frans, ha koustet ker ker dezhi, a oe roet evid netra da Victor Emmanuel.

Gouarnamant hennez a ioa kargour ha diez da garga. D'ar mare-ze e c'hlaouere gant ar c'hoant da gaout douarou all; gouzout a reat e skrabe evid lounka ar rouantelesiou en dro de hini. Da zifiziout oa anezhan; rag-se e oe great dezhan guesla ne vije boulc'het, a nep tu, douarou ann Ilis. Kemeret a ra Doue da dest ne raje birviken eun dra ken iskiz. Pa! mez ar c'houarnamant ze a renker kemeret he gomzou a gil. Komzou brao diouc'h ann druill; lavariou kaer, kement a ma kerer, oberou kam bep tro ma c'helleur. Selaouit hag e velfot.

En Itali neuze, oa eur maread rouantelesiou bian, hag en ho fenn, rouaned kar tost da Victor Emmanuel.

Petra ra he-man?

Paea lakipoted da c'houeza ann tan, da ober freuz er rouantelesiou bian-ze; ha pa vez digoret ar freuz, Victor a lavar evellen: « Ann dud keiz-ze, emezhan, ho deuz c'hoant da zont daved-hon; n'ounn ket evid ho dilezel. » Ha ractal, gant he soudarded, e za da deurel er meaz ar rouaned, he gerent, ha da gemeret perz en ho douarou.

Setu ive penaoz e kemer he dro evid fripa douarou Sant Per. Er c'heariou brasa, e kas louparded a leiz, landrusenned Garibaldi, da iouc'hal ha da ober skrab.

TREDE KOUBLAD.

« Ar Roumaniz, eme ann Aotrou, n'oant ket evid
« en em glevet gant ar Fab; goulenn a reant en em
« c'houarn ho unan, evel ar broiou all. »

DISKAN.

Pebez gaou divezed! All lampoured divroidi a c'houlenne traou evelse, guir eo. Eur boutegadik tud epz ar vro, re eaz en ho dillad, c'hoant dezho da ober netra, pe debret ho feadra gantho, a iouc'h ive a bouez penn;

guir eo c'hoaz. Ha ne ket souez, Aotrou. Ar voen tud-ze a zicuan e pep bro. O veza n'ho deuz netra da goll, e klaskont ann tu da skrabat d'ho beg, hag e vezont atao o klem, oc'h arzal, evel châs duet gant ann naoun. Ne ket ar Roumaniz avad nag ann darnvuia a bobl ar Pab a c'houlenne traou en doareze. N'int ket diskiant. E Roum, ne baet ket ann tregonved euz ann taillou a baer er broiou all. Eno ne veze morse tennet d'ar zort. Ar Pab a c'houarne he sujidi evel eun tad mad he vugale.

Ar pab n'en doa arme ebet ; penaoz eta kabesta ar iouc'herien divroed, ann trubarded, henvel ouc'h ar re a ioa e Paris varlene, ha kaset e douarou sant Per gant Victor Emmanuel ?

Tud a galoun euz hor bro a ia da Roum da servicha ar Pab. An dud-ze eo a skuille ho goad, varlene, evid difen ar Frans. N'ho doe ket a boan o reiza ar guchen ribitail en em ruzet er vro. Mez eun dervez, ep lavaret netra, Victor Emmanuel a laosk varnezho eun arme vraz. Ar Fransisien n'oa nemet eur vozad anezho ; frigasat e oent, kemeret ar pezh a ioa a vad e douarou sant Per, ha lezet epken gant ar Pab ar gear a Roum, hag eun dachaden letoun dizaour tro var dro.

An nebeud peadra, evid gouarn ann Ilis, a ioa fripet, ar mizou n'oa tam rabat varne-

zho ; rag-se ar Pab, tad ar gristenien, ne hell mui beva, nag herzel ouc'h ar mizou, nemet dre an aluzen a ro dezhan he vugale, dre ar pezh a c'halver diner sant Per.

Mad ! pa edomp etre skilfou ar Prus, ann Itali, savet ha prenet gant hon arc'hant ha gant goad hor zoudarded. ann Itali dinatur, n'oa netra anez omp-ni, a ia a enep he ger, a grog en tam diveza, a gemer ar gear a Roum.

Ar republikaned a Frans, ann Aotrou Jul Favr, neuze e penn ar c'houarnamant, a gasas eun den euz he berz da ober he c'hourc'hemennou da roue ann Itali ; da lavaret dezhan en doa great buan, brao ha kempen he dro.

Ann Aotrou Morvan, ervez he glevet, en deffe ive evel c'hoant da boket da zeulio ann Itali, da lipat daouarn Victor Emmanuel ; ne fell ket dezhan e ve iouc'het var all laer, na great rebech ebet dezhan.

Hag all lealdet, Aotrou ! hag ar justis, hag enor hor bro. Petra ! skournet eo ar goad en hoc'h izili ? M'ar deuz eur galoun den en ho kerc'hen, soublit ho penn, pe da vian achoumit peoc'h gant ar vez.

— « Goasket oamp, eme an Aotrou, red eo digas « hor zoudardet euz a Roum. »

— Ia ! Mez roet euz sclerijen d'ann nep a

zo digor he zaoulagad. Ann dervez ma teue
hor zoudardet euz a Roum e voe flastret hon
arme gant ar Prus. Eun tachad a zo, Napo-
leon a ioa o c'hortoz ma varfje ar Pab ; evit
rei oll douarou ann Ilis d'an Itali. Tumpet eo
bet ha skubet er meaz euz he vro.

Doue a zo just, Aotrou, divun a ra bep ann
amzer !

Ba ! Laerez douarou sant Per, n'eo nemet
laerez douarou ann Ilis. Leve ann Aotrou
Morvan a joum atao etre he zaouarn.

— Lakit evez, Aotrou, ha c'houi ive, tadou
oc'h euz eur guennek bennag ! D'ar revolu-
sion genta, goude beza laeret madou ann Ilis,
e oe sunet danvez ann noblanz. En amzer-
vrema, danvez ann Ilizou a zo treud ; danvez
ar re ho deuz peadra a zo deuet ho zro hivi-
ken. E Paris, er misiou diveza, e kemeret e
leac'h ma kavet. Paotret ar freuz a zo digor
ho c'haloun ; eur veach tanvead, e kemerint
keit a ma choumo.

PEVARE KOUBLAD.

« Ann Eskibien, eme ann Aotrou, a c'houlenne
« ober brezel d'ann Itali. »

DISKAN.

Eur gaou sklear hag anat, Aotrou ! Den ne
c'houlenne ober brezel ; gouzout a reamp,

koulz a c'houi, ne hellet ket hen ober brema.
C'houi eo hag ho konsorted, evid dalla ann
dud, ha paka ho mouesiou, ho peuz savet ar
spounail-ze a zirag ho daoulagad.

Ann Eskibien a c'houlenne ma vije koun-
daonet ar fallagriez-ze, ma vije iouc'het harz
var ar bleiz ha var al laer.

— Mez da betra gourdrout, eme c'houi,
pa n'omp evid ober netra ? Perak lakat ienien
etre-z-omp hag ann Itali ?

— Her guelet hon euz, meur a veach,
Aotrou, ann Itali a zo ratik ; pa vez great
penn dez-hi, kerkent e teu da argila.

Ha goudeze ? Petra ! var digarez m'eo kre-
foc'h all laer evidhon, e renkin lavaret eo
mad ar pezh a ra, stoui diraz-han, ha rei, en
eur vusc'hoarzin, eur bennoz Doue dezhan !
Ma ne ket an dra-ze krena gant ar spout,
evel eur bern deillou ; ma ne ket ann dra-ze
falgalouni, penaoz her galvit-hu, Aotrou
Morvan ?

PEMPED KOUBLAD.

« Ann Itali a ro d'ar pab tri milion. »

DISKAN.

Livirit « e deus kinniget, » Aotrou ; mes
livirit ive en deuz ar Pab, evel guechall Sant

Per, respountet d'al laer « *mont da goll gand he arc'hant*, » arc'hant he laeronsi.

M'en divije ar Pab aotreet guerza madou ann Ilis, evel ma verzaz Judas hor Zalver, guechal, oa achu ann abaden pell a zo. Mez n'en deuz her great, ha ne raio biken. Ar Pab n'eo ket evel kalz tud a zo brema, ne reont forz penaoz na gant petra, gounit arc'hant, gant ma c'hellint dastum danvez.

Ma ve laeret he zanvez digant ann *Aotrou*, a roet dezhan cant scoed er bloaz, petra a lavarfe? Guir eo, emezhan, gant ar c'hant scoedze ne varvin ket gant ann naoun; mez ne ket eno e ma ar stal. Va danvez a zo din, ne ket da eun all eo. Ebad eo d'all laer rei cant scoed er bloaz, d'ann hini m'en deuz laeret dek mil skoed leve divar he goust.

CHOUEC'HVED KOUBLAD.

« Pemp gueach muioc'h evid ann Aotrou Thiers ! »

DISKAN.

Dre ann aluzennou a vez kaset dezhan, ar Pab, marteze, en deuz ouspen dek gueach muioc'h eget ann Aotrou Thiers.

Mez livirit ive eta, Aotrou, pegement muioc'h a zispign en deuz ar Pab.

Divar ar pezh a vez roet dezhan, ann Aotrou Thiers ne bae ket he vevellou, na kement

hini a zo er c'hargou. Ni eo a bae ann oll dud-ze, hag a ra ar mizou evid izommou ar Frans. Evid ar mizou-ze, e vez lakeat, bep bloaz, etre daouarn, ann Aotrou Thiers, ne ket tri milion epken eo, mez *daou vil pemp kant milion* !

Pae ann Aotrou Thiers a joum kempen ha founnuz en he c'hodel.

Goudeze, Aotrou, livirit din, m'ar plij, gant petra e vago ar Pab hag e paeo ar gardinalled, he guzulerien?

Gant petra e vago, ec'h antreteno ann Eskob braz, a gas da bep bro, evid dioual, kelen hag alia ann Eskibien, ar gristenien euz ar broiou-ze? Gant petra e roio bara d'he servicherien goz, tadou a famill, taolet er meaz gant ann Itali? Gant petra e paeo ann niver dud, karget da skrifa ha da reseo liziri euz a bevar c'horn ar bed? Gant petra e savo, e skolio kloareget da vont d'ar broiou pell? Gant petra e kaso ebestel d'ar broiou gouez, e sikouro anezho da sevel Ilizou, e preno dezho kaluriou, ha guiskamanchou oferen?

Livirit din, Aotrou, gant petra e raio aluzennou !

— O, eme c'houi, ma n'en deuz ket, ne rai ket aluzen.

— Tra, Aotrou; mez ma ne ve mui tud pinvidik, guaz a-ze d'ar beorien !

D'hor bro-ni epken, Aotrou, abaoe ar

freuz a zo bet, ar Pab en deuz roet, en aluzen,
talvoudegez ouспен anter-kant mil lur !

Er misiou diveza, ar Pab en deuz great eur
pevar-ugent eskop, evid ann Itali. Goude beza
laeret madou ann Ilizou, gouarnamant ar
vro-ze ne ro d'ann Eskibien na ti na poued.
Ar Pab, divar he aluzennou, en deuz en em
garget da rei dezho ann eil hag egile.

SEIZVED KOUBLAD.

« Ar Pab n'eo mui, nemet Tad ar Gristenien. »

DISKAN.

Aotrou keaz ! evid doare n'eo mui tad
deoc'h-c'houi !

Aman, Aotrou, e santan va c'haloun o
ranna, hag ar bleo o sevel var va fenn !

N'ouzoun ket petra zo krefa em c'haloun,
pe ann eug o velet ho kaloun-c'houi ker
kaled, pe ann doan, var ho sikour, o velet ho
spered ken dallet.

Tud Lannilis, tud a feiz, a zo eur galoun
en ho kerc'hen, ma velfec'h eur bugel dinatur
o teurel er meaz he dad keaz, deuet d'ann
oad a bevar ugent vloaz, ne santfec'h ket ann
daelou o tont en ho taoulagad hag ho koad o
virvi ?

Ma velfec'h ar map dinatur-ze, pa vez he

dad oc'h huanada, hag oc'h hirvoudi, o tont
da ober goap anezàn, da lavaret dezàn en
eur vusc'hoarzin :

« Va zad, emezhàn, sec'hit ho taelou, n'ho
« peuz tam tro da vouela. Bete vrema oa
« torret ho penn gant ann tiegez, setu c'houi
« disafar ha didrabaz. Hivisiken n'ho pezo
« ken da ober bemdez nemet klask ho poued
« hag ho lojeiz. »

Me her goulenn diganeoc'h, tudou, ne rofec'h
ket eur stafad d'ar map digaloun-ze ?

Mad ! setu petra rà, ha goassoc'h zo ken,
ann Aotrou Morvan da dad ar gristenien.

Victor-Emmanuel en deuz taolet ar Pab er
meaz, hen lakeat var ann douar noaz. Ar
Republikaned, hag an Aotrou Morvan, a laka
var he gein eur zae lien, eu he zourn eur
benduen, hag, evel ar iuzevien pa edo hor
Zalver ouc'h ar groaz, a deu da stoui dezhàn
en eur c'hoarzin a gorn ho lagad, da ober
goap ha da lavaret : « Ni ho salud tad ar
gristenien ! »

Ma ne ket piket ho kaloun, Aotrou, o velet
ho tad er boan, troit ho penn da viana hag
iit abiou ep lavaret ger. En hano Doue ne
joumit ket a za, evit goapaat, ha dreist oll,
ne gasit ket levriou d'ho kenvroiz evid tenna
euz ho c'haloun ar feiz, ar garantez ho deuz
evid ho zad !

— « Ann Italianet, » eme c'houi, « ho
deuz respet evid ar Pab. »

— Ia, Aotrou, evelloc'h-c'houi, pe var dost ! bep ar mare, e zeont da iouc'hal dindan he brenecher : *Ar veleien d'ann traon, ha maro kriz d'ar Pab.*

— « Ne ma ket er prisoun, » eme c'houi, « en eur palez ema ar Pab ! »

— Petra ra-ze, ma ne hell dont er meaz dindan boan da veza goapeat, labezet ha ma-c'hagnet marteze ? O tiouall dor ar palez ema soudardet ann Itali, fuzuliou karget gantho. N'euz ket pell, daou Eskop e palez ar Pab, a lakeaz ho fenn en eur prenest, da sellet er meaz ; kerkent eur zoudard a vizaz varnezo.

Ar gouarnamanjou a oe trufuillet, ann Itali a glaskaz digaresiou, a lavaraz ne c'hoarveje mui kement-se.

Nac'hit an dra-ze, ma kredit, Aotrou Morvan.

EIZVED KOUBLAD.

« Ar Pab a zo brema evel eur persoun en he « barrez. »

DISKAN.

Kem a zo eun nebeud, Aotrou.

Pa en deuz izomm persoun Lannilis da gelen he bobl, hag e ve ar mear hag he vignouned, lod er porched, lod a zirag ar gador, evid klask he spounta, ar persoun a c'hell ober he brezegen. M'en deuz ann

Aotrou Abgrall da vont da velet unan klanv d'ann Treiz pe d'ann Diouriz, c'houi, Aotrou, hag e vec'h mear, n'oc'h euz nep guir d'hen dialben. Ueloc'h evid ar mear ema ar prefed ; ueloc'h evid ar prefed, ar c'houarnamant ha lezennou ar vro.

E Roum, brema siouaz ! Ar mear eo ar roue Victor Emmanuel, a ra all lezennou ervez he frouden. Ma vez izomm d'hen diskuill, pe d'her scandalat, e kavo pounner klevet ar virionez. Ma tisplij dezhan kelennadurez ar Pab, e klasko miret outhan da brezeg, ha moug a ar c'homzou e toul he c'houzoug.

Ma kar e viro ouc'h ann Eskibien da vont en he rouantelez, da vont da gaout ar Pab, da c'houlenn kuzul diganthan. Koulz ha ma c'hell miret oud eur c'hannad, a berz ar Pab, da vont er meaz euz ann Itali evid kas, dre ar bed, gourc'hemennou mestr ann Ilis.

Ar post, ann telegraf a zo etre daouarn roue ann Itali.

Nemet dindan guz eta, ne ielo, a berz ar Pab, d'ar broiou all, nemet all liziri a lezo ar roue da dremen. Ma kar ho dalc'ho, pe, ma en deuz c'hoant, e c'hell liva, diouc'h he c'hiz, ar guirionesiou kemennet gant ar Pab d'ar gristenien euz ar bed oll. Penaoz neuze, pa deu eur rouden euz a Roum, gouzout hag all lizer a zo evel m'eo great gant ar Pab, pe

hen a zo bet troet var ann tu a enep, blounset ha boulc'het gant gouarnamant ann Itali ?

Pa c'hell ar Pab kas he gelennadurez da bevar c'horn ar bed, ne da divar ann hent mad nemet ann nep a gar ; pep hini a vel freaz he hent. Ma ne deu deomp nemet sklearou, e vezo poan o velet sklear.

Araok brema, ar Pab a zo bet kaset, meur a veach, er meaz a Roum, ha Doue hen digase en dro adarre. Peur ha penaoz ec'h achuo ar freuz a zo brema ? Ne oar nemet Doue.

Kaer a vezo, evid guir, ar virionez a joumo dibikouz. Doue en deuz diskleriet e padje ann Ilis betec fin ar bed. Epad tri c'hant vloaz, goude maro hor Zalver, ar Pabet, ann eil da c'houde egile, a veze lakeat d'ar maro.

Setu eno, neuze, Aotrou, eur garg pounner, eur plas riskluz ; ha gousgoude ne joume morse goullo. Ar gristenien a renke servicha Doue dre guz. Enn despet da-ze, ar feiz en em astenne ; goad ar verzerien a rea tremp da zouarou ar bed oll, hag a lakea da ziouan kristenien nevez.

N'euz forz gousgoude ; ma teu beac'h ha freuz var ann Ilis, guaz aze d'ar gristenien ! Meur a hini, siouaz, a ielo da goll ! Pa ziroll re abred avelou balc'h, kalz frouez a zistag diouc'h ar vezen, araok beza dare.

NAVED KOUBLAD.

« Ann Aotrou Thiers, « eme ann Aotrou, » en « deuz lavaret ne felle ket dezan. »

DISKAN.

Ne ket roget ho kinou gant ar gaou-ze, Aotrou ?

Ann Aotrou Thiers en deuz lavaret ne ket hen en doa great ann droug, ha n'oa ket gwestl d'hen digoll. Diskleriet en deuz ne c'helle ket ober brezel brema. Mez den ne c'houlenne kement-se diganthan. N'en deuz ket lavaret, avad, ne felle dezan ober netra evid ar Pab. Er c'hontrol, diskleriet en deuz e raje he c'halloud evid ma vije ar Pab distrop diouc'h pep gouarnamant da c'houarn ann Ilis hag ann eneou. Ha beteg eno, emezan, ec'h aotreat ar pez a c'houlenn ann Eskibien.

Mad, ann Aotrou Morvan n'en deuz ket votet evel-se ; strisoc'h eo bet c'hoaz eget ann Aotrou Thiers ha votet en deuz evel Gambetta. Votet en deuz e coustianz, emezan ; da veza kredet eo. Mez da viana e ro eun taol biz troad d'ar virionez o lavaret en deuz votet evel n'en deuz ket. Abaoue en deuz votet c'hoaz gant ann tu kleiz : goulennet en deuz ma vije paet ar gonsellerien general. C'hoant kaout diou bae, marteze, m'ar gelfe mont adarre da Gemper.

Perak kuzat ann traou-ze, Aotrou ? M'ar d'oc'h louarn, ne guzit nag ho lost nag ho

tiskouarn. Mar d'oc'h bleiz, en hano Doue, lezit ho tent dizolo, ha peb hini a c'hello gouzout petra oc'h ?

Achu koublajou ar Pab; deomp d'ar c'houblajou diveza.

EIL KOUBLAD VARN'UGENT.

« Guechal, eme ann Aotrou, ar persoun a ioa
« mear ha persoun assamblez. »

DISKAN.

E pe seurt toul d'ar eo bet ann doctor o turiat, evid difoucha historiou truiloc evel-se ?

Bennoz Doue d'ar veleien, me a zo bet er skôl. Bet ounn er skolach, m'en deuz great ann Aotrou he studi en-han; bet em euz, zo ken, prisiou e va amzer. Neuze, hag abaoe, em euz lennet meur a histor euz va bro; biskoaz m'em boa klevet kement all. Pa ra eur vaouez he mestrez en eun tiegez, e vez lavaret avechou : « Hounnez a zo bragez ha losten gant-hi. » Biskoaz n'em boa klevet lavaret e vije eur persoun, persoun ha mear assamblez; biskoaz n'em boa klevet lavaret, pa deue ar persoun er barrez, da c'houde beza lakeat alc'hoesiou ann ilis etre he zaouarn, e vije taolet ar chelp en dro d'he gerc'hen.

D'ann deisiou sul ha gouel, livirit din m'ar

plij, Aotrou, pe var ar gemz pe var ar chou-piliz e veze ar chelp gant ar persoun ?

Eur gentel desket fall, Aotrou; red eo dont var ho kiz, ha selaou eun tam skôl.

Ar veleien ho deuz desket deoc'h, penaoz, ervez ar c'haierou koz, ha skridou ann amzer dremenet, « er parresiou e zoa fabriket, ten-
« zorierien, karget da c'houarn ar barrez,
« hanvet bep bloaz. Ha choazet gant ar Je-
« neral, da lavaret eo, gant eun assemble,
« a zalc'he plas oll dud ar barrez. En assam-
« ble-ze, e veze ar varnerien, fabriket ar
« bloavesiou diaraok, tadou a famill, kement
« ho doa madou er barrez, muioc'h a zeska-
« durez, ha muioc'h a vrud vad. En eur ger,
« ar pennou braz euz ar barrez; ar re-ze eo
« a rene afferiou ar barrez skoaz ouc'h skoaz
« gant ar persoun (1). »

Evel ma vez brema ar mear e conseil ann ilis, ar persoun ive, a veze ive neuze e conseil ar barrez. Mes ne ket ar persoun eo a rea ann eleksion. N'oa nemet-han he-unan, a veleien, etouez kement all a dud.

Kaout a ra deoc'h e zoa braz avoalc'h godellou ar persoun evid lakat ar varnerien, ann dud all desket ha pinvidik, en he c'ho-dellou ? Ar c'honseil-ze ne veze ket atao a unan gant ar persoun. Avechou, p'en deveze c'hoant ar persoun da vont a zeou, ar re-ze a zalc'he a gleiz. Guechennou e veze prosez etrezho; hag ar persoun ne c'houneze ket bep

(1) Feiz ha Breiz.

tro. E kaierou koz Lannilis, aotrou, ez euz menek euz eur prosez en doare-ze.

Sklear avoalc'h eo ar gentel-ma, aotrou?

— Gousgoude, eme c'houi, ar persoun en doa kalz galloud.

— Guir eo en doa eun nebeud levezoun, var ar re all, abalamour d'he garg ha d'he zescadurez. Mes brema, aotrou, ne ket ann dud desket, ann dud a zanvez hag a zoare eo a zo o lakat ann traou da vont en dro?

Ar baotred saout eo a vez kaset d'ann ti kear brema? Koumpiri Ian Drotach eo a vez lakeat da vear brema e Lannilis?

— « Ar veleien. » a livirit c'hoas, » a zibabec tud diouc'h ho dourn.

— Goassa a zo eo, aotrou, ne ket hi a rea ann dibab. Ha neuze, aotrou keaz, perak rei baz d'ho kanna?

Pa brenit eur gazez, da vont da velet ann dud klàn, klask a rit unan beizik, amjest, spountik, dare da ziroll ha diez da ambreger?

Pa oac'h mear, aotrou, klask a reac'h, evid mont ganeoc'h en ti kear ar re a veze ho prasa enebourien? Ne zibabec'h ket, guella ma c'hellac'h, ann dud a veze a unan ganeoc'h, eaz da gas ha da zigas, ann dud a veze diouc'h ho tourn, ar re a gave eaz ober diouc'h patrom ha debri iod diouc'h ar biz?

TREDE KOUBLAD VAR'N'UGENT.

« Ar Republik a zo divisoc'h eget eur roue. »

DISKAN.

Penaoz eta, neuze, en amzer Louis XVIII

ha Charles X, goude beza roet kement a ar-c'hant d'ann enebourien, eo bet paet ann dle great gant ar Republik kenta, ha distroc'heuliet madou ar vro?

Penaoz eta, c'hoaz, bep Republik a zo bet, e veze fuillet ann danvez, ha dastumet dle, bern var vern?

Aliez am euz klevet lavaret, e leac'h ma vez kalz a dud o koumandi, e za kalz falloc'h ann traou en dro. Ouspen-ze, ma ve, bep ar mare, chenchet mestr en eun tiegez, heman mestr hirio, hen-hont mestr varc'hoaz; ma ve lezet ar vugale. ar mevellou, da henvel ar penn tiegez, ha d'hen diskar ervez ho frouden, dizale, me laka, e trofe an ti var ann tu a enep, ha ne dafe ket ann danvez var gresk.

— Dibaot ann dud a binvidika, o renkout aliez diloja.

Gouscoude, hen anzaot a zo red, guelet a ve gellet eur Republik mad hag onest. Goassa a zo eo, kement Republik a zo bet en hor bro, a ioa truillok, diskempen ha didalvez. Epad ar revolution genta, e rede ar goad evel ar glao. Dremm ar c'hillotin a ioa skuiz ha touc'het; hag euz bet beuzet tud a gordennadou.

E 1830, euz bet ive diskaret buez meur a hini, hag egaset meurbed ar relijion. E 1848, ez euz skuillet goad a leiz, har euz bet var ar mare da velet goassoc'h kalz. Beleien, ne ouzeur ped a zo bet muntret e Paris. An tan a ioa e kear, hag ann tennou var ar veleien ha var ann dud a urs vad.

En eur ger, kement Republik a zo bet, bete

vrema, a ioa goad ouc'h he dillad, ha goad ouc'h he daouarn.

Selaouit petra en deuz lavaret, er Gambr, divar-benn ar Republik, ann aotrou Thiers, mignoun ann aotrou Morvan, hag hirio mear braz var hor bro :

« E Frans, emezhan, ar Republik a zo eun « dra gaer, gant ma ne vezo ket republika- « ned oc'h ober anezhi. »

An dra-ze, tudou, a zo evel ma lavarfec'h, c'houi, da unan a zo o veuli ar iod-bizin dirazoc'h :

« Ar iod bizin, eme c'houi, a zo eun dra « vad ; ia gant ma ne vezo ket a vizin oc'h « hen ober, da lavaret eo, gant ma vezo great « gant bleud kerc'h pe gant bleud guiniz-du. »

PEVARE KOUBLAD VAR-N'-UGENT.

« En despet d'ar republik ha d'ar pezh a lavare ar « veleien, em euz kavet ann ilizou digor. »

DISKAN.

Ia, Aotrou, o veza ma ne ket bet paotret ar freuz ar re grefa. Ma vije bet ar re-ze mistri er vro hag er gambr, evel ma zint bet ar vistri e Paris, e vije bet chenchet penn d'ar vaz.

Varlene, e Paris, noa ket kalz a ilizou digor. N'oc'h euz ket klevet, Aotrou, pebez dizurchou ha pebez fallagriez a zo bet great en-ho?

« — N'em euz ket klevet, eme ann doctor, e ve miret ouc'h ar veleien da gesta. »

— Evid doare, Aotrou, ne glevit na buan na nemeur ; rag e diou barrez, tost d'ho kanton, euz bet c'hoant da viret ouc'h ar veleien da gesta.

« — Ho fae ho deuz atao, neuze ket a rabat varnezhan. »

— Ar c'hure, Aotrou, en deuz pevar c'hant lur, er bloaz ; nebeutoc'h eget eur c'hantonier. Ma ne vije mad ar Zant hag ar barrisioniz evit-han, e vije ber ar peuri gant-han, ha tano meurbed ann aluzennou a helfe da ober.

Ar persoun en deuz ann daou farz muioc'h ; mez, aliez n'en deuz ket ar bederved euz ar pezh en doa kemeret ar republik kenta divar goust ann ilizou.

PEMPED KOUBLAD VAR-N'-UGENT.

« Ar veleien, » eme c'houi, » ho deuz min vad. »

DISKAN.

E Paris, Aotrou, eo bet lazeta ann arc'heskop ; lazeta euz bet vikelet-vraz, persouned, kureed, kloareged, menac'h, breudeur pe freret, archerien, soudarded, tud a urz.

Pa zoc'h en em gavet e Paris, oa ruz-du ar vein er palesiou, hag an tiez deved. Goad ar veleien a ioa c'hoaz fresk ha tom ouc'h ar mogerioù, hag hoc'h euz ar galoun da lavarret : epad ar republik, ar veleien ho deuz min-vad !

Daoust hag a forz da velet tud klanv ha tud o vervel, ne rit van mui, Aotrou, o velet ar goad o ruill ?

C'HOUEC'HVED KOUBLAD VAR-N'-UGENT.

« Ne glaskan, « eme ann doctor, » na lakat goad « da ruill, na daouanteri ann danvez hag all leviou. »

DISKAN.

Tra ! tra ! Aotrou, gouzout a reomp ann dra-ze.

C'houi, avad, a zo dall, ma ne velit e m'oc'h o tomma dour d'ho skaota, hag o rei d'ar re all tro da ober ar pezh ne fell ket deoc'h ober hoc'h-unan.

D'ar revolution genta, goude beza gual lakeat ar veleien hag ann noblanz, ar vourc'hisien a bignaz er c'hargou, evid ren ar vro en ho leac'h.

Neuze, da viana, ho dever e vije bet hentcha mad ar re m'oant karget anezho, hag ho doa nebeutoc'h a zeskadurez evit-ho.

Hogen, siouaz, ne ket evel-se ho deuz great peurvuia !

Ar c'houarnamanjou, abaoue, a gemer evel plijadur oc'h egas ar relijion, oc'h hiskinat ann ilis.

Evid guir, e pep bro hag e pep leac'h, e vez kavet meur a vourc'hiz kristen, ha kristen c'houek zo ken.

Mez hounnez eo all loden vian siouaz !

E touez ann darnvuia anezho, eo rouez ar

re a zo aketuz da dostaat, bep ar mare, ouc'h ar sacramanchou, ha da ober c'houek ho relijion, evel ann artisanet hag all labourerien, ho deuz dalc'het mad d'ho feiz.

Diouc'h ann tu-ze, ar skuer, a ro kalz anezho, a zo truezuz meurbet. O velet, o klevet anezho, ann dud paour hag ep deskadurez, a ra diout-ho, hag, evel-se, ne ket var vellaat e za ar relijion.

Goassoc'h, siouaz, ho deuz great ar rum dud a gomzan anezho. Eur c'hant vloaz ben-nag a zo, dre ho skridou, dre ar gazetennou, e labouront, a zrevi, da vonga ar feiz e kaloun ann dud a boan. Ep her gouzout, mar-teze, dre all leor en deuz skrifet, ann Aotrou Morvan a ra ar vicher-ze d'he dro. Siouaz dez-ho, ha d'ar re all, deuet int a benn da izellaat ar feiz ; a setu amañ, dizale, petra c'hoarvezo, ma ne deu Doue da sellet a druez ouzomp.

Eur galoun eat Doue er meaz anezhi, a zo goullo meurbet, ha neuze e sao gant-hi naou diremed a blijadurezo hag a vadou ann douar.

Bete vrema, evid mont er c'hargou ha choum en-ho pa vezont eat, ar vourc'hisien a laka da ober skeul dez-ho, ha da harpa anez-ho, ann dud paour a rezeudik, tennet doujanz Doue euz ho c'haloun. Evid lakat ann artisan da gasaat ann amzer goz, ann amzer a feiz, e vez iset, bep ar mare, a enep ann noblanz, a enep ar veleien, hag a enep ar relijion, ann dud keiz-ze, o kredi e vijent

distrop a bep poan, pa ho divije troet kein da Zoue, a gase ar vourc'hisien er c'hargou. Ar re-man a rea dez-ho promessaou ar re gaera; a lavare ne glaskent nemet mad ar bobl, mad ann dud ho deuz izomm.

Mez promessaou ne dorront ket ann naoun, ann dud rezeudik a chom ho foan gant-ho, evel kent. O veza ne ma mui Doue o sikour anez-ho da zougen ar samm, e kavont re bounner ar beac'h.

Setu hi skuiz hag inouet; n'ho deuz mui aoun rag Doue, ne zoujont nemet ar vaz. — Hogen, ar re n'ho deuz ket a beadra, a zo muia anez-ho; ar re grenfa int, her gouzout a reont. Evel-se, er c'hearieu braz, ann artisanez n'ho deuz ket a feiz a vez klevet o lavaret :

« Ni, emez-ho, a zo atao el labour, er boan,
« en dienez; ann dud pinvidik, atao en eaza-
« mant, ep ober netra. Ar falla er meaz !
« Chench tro pelloc'h ! deomp-ni hivisiken
« eun tam ean, hag eun nebeud peadra; hag
« ar re binvidik, divar ar mare, da labourat
« en hon leac'h ! »

Eun trubard, a ioa varlene e Paris, a zo eat da guzat da vro-saoz (ar re-ze, a dec'h buan, pa sao beac'h varnez-ho). Eno e skrifer en eur gazeten; en deizioù diveza, e lavare ar c'homzou-ma :

« Bourc'hisien, tud pinvidik, emez-hân, ar
« veach-ma hon euz kollet; mez dizale e
« teuo hon tro, ha neuze e kousto ker deoc'h.
« Kement ho peuz a vezo fripet, kement hini

« ac'hanoc'h a vezo tumpet ! ho kragez, ho
« pugale, ho tud, hag e ve bleo guenn var
« ho fenn, a vezo lakeat d'ar maro. Evid ober
« hon tro, eo red deomp DISKAR TREGONT MIL
« DEN; DISKARET E VEZINT. »

Bezit' disafar eta, Aotrou, ma vez ann dud-ze ar vistri, n'ho pezo ket izomm da vont var ann hentchou braz da fuill ho tanvez. Ar re-ze a ielo d'ho ti, d'her c'herc'hat ha d'en dastum kempen. A dra-zur, c'houi ne fell ket deoc'h skuill goad. Mez ar re-ze ne espernint nag ho puez-c'houi, na buez meur a hini all. Varlene, e Paris, daou vignoun deoc'h, daou republikan a bell amzer, ann Aotrou Chaudey hag ann Aotrou Thomas, ne glaskent ket skuill goad ken nebeut. C'hoant ho doa, zo ken, da viret ouc'h ho c'honsortet da ober traou ken iskiz; — Paotret ar freuz a grogaz en-ho, hag ho lakeaz d'ar maro.

Mad, Aotrou, Paotret ar freuz a lavar beza republikaned, ha re vad zo ken. Paotret ar galeou hag oll lampouned fall a lavar evel-d'ho. Er gambr, eun den a spered a lavare, n'euz ket pell : « Beza ez euz republikaned
« onest, emezhân; a dra-zur, ann oll repu-
« blikaned n'int ket aillounet; mez ive, avad,
« ep mar ebet, kement ailloun a zo, a zo
« republikan var he veno. »

Lakit evez eta, Aotrou; ne c'hoariit ket gant an tân. Eaz eo distaga eul loan direiz; mez diez braz eo he baka hag he gabesta da c'houde. Ann dud a red bro, o tiskuez loened gouez, ne varvont ket aliez en ho guele, a

levereur; peurvuia e vezont mac'hagnet pe zebret gant-ho.

SEIZVED KOUBLAD VAR-N'-UGENT.

« Ann Eleksionou a zo affer ar bed. »

DISKAN.

Hag affer ar goustianz ive emichans! Choaz unan fall, Aotrou, a zo ken direbech evel choaz unan mad?

« *Affer ar bed,* » eme c'houi? mez diouc'h ma reomp hon afferiou er bed-ma, e reomp ive, pe ne reomp ket, hor zilvidigez. Laerez pe laza a zo ive afferiou great er bed-ma, ha gousgoude, me gred, e vezo renket ho dibuna er bed-all.

EISVED KOUBLAD VAR-N'-UGENT.

« Ar veleien a laka ann dud *ignorant* da voti » gant-ho. »

DISKAN.

Ann dud *ignorant*! Pakit ann dra-ze, tud Lannilis. Guelit pebez dismegans a vez great euz ar c'houer keaz.

Ma votit evid ann Aotrou, setu c'houi desket braz, ha ne vec'h bet biskoaz er skôl. Kaer ho peffe, avad, beza ker skoliet hag ann Aotrou, ma votit evel eur beleg, ema ann troad leue a dreuz en ho kinou, n'ouzoc'h ket ho *Pater*, zo ken.

NAVET KOUBLAD VAR-N'-UGENT.

« Ar veleien a ra gaou ouc'h ar relijion. »

DISKAN.

Ma lavarfen-me deoc'h e louzaouit fall eur goull, c'houi, am distrofe evelen: « It d'ar skôl da genta, eme c'houi, araok klask skolia tud guiziecoc'h evidoc'h diouc'h ar c'hlen-vejou. »

Mad, Aotrou, c'houi var a velan, n'oc'h ket eat doun en ho Katekismou. D'ho tro eta ive selaouit ac'hanon: Distroit da skôl ar vugale, a lezit ar veleien da c'houzout petra a zo mad diouc'h petra a zo fall evid ar relijion.

TREGONTVED KOUBLAD.

« Ar veleien en ho ilizou. »

DISKAN.

Eun tachad a zo, marteze, ann Aotrou a ve guell gant-han ho guelet er garnel. Pa vez ann taillou da baea, hag aner da ober, ar veleien, koulz hag ar re all, a vez difouchet brao euz ar prosptial hag euz ann ilis.

M'oc'h entent, Aotrou, ar veleien en ilis, Doue en he varadoz, ann dud a urz hag a feiz e toul ann oaled o tourna pateriou, ha c'houi, neuze, hag ho konsorted, oc'h ober ho c'hoariou evel ma kirit.

— « Ar veleien, » eme c'houi, « ne dle-fent ket en em emel euz ann eleksionou. »

— Hag abalamour da beseurt Sant? Ho mignouned - c'houi a c'hello fistoulad; eur mezhier, eur galouper poullou a c'hello prena mouesiou gant banneou, hag eur beleg, var digarez ma zeuz enn tam mezer du en dro

dez-han, var digarez ma ne glask ket he vad he-unan mez mad ar barrez ha mad ar vro, var digarez, marteze, m'en deuz muioc'h a zeskadurez guirion eget ann hini a zo o klask mont er c'hargou, ar belek ne c'hello ket rei d'he barrossioniz eun ali mad ervez he goustianz?

Arabat deoc'h kaout aoun, ne roint ket a vanneou. Ar re-ze a gred e tâl koustianz eun den muioc'h eget eur banne guin-ardant.

KENTA KOUBLAD HA TREGONT.

« Lezomp Doue en he Varadoz. »

DISKAN.

Er C'hatekismou e lenneur « e ma Doue
« en Env, var ann douar, hag e pep leac'h. »
Bezit dienkrez, Aotrou, ann oll republika-
ned ne deuint ket a benn da denna Doue euz
he varadoz; mez ac'hano e c'houarn ar bed
hag e ma ho kempen deomp diouc'h ma re-
fomp.

« — Lezomp Doue en he varadoz. »

Ann diaoul a lavaraz kement-se ive d'hor
mam genta evid he foulza da bec'hi. Gouzout
a rit peur en doe Adam c'hoant da velet Doue
o choum en he varadoz, ha peur ez eaz, evid
ar veach kenta, da guzat araok Doue? Goude
beza great he bec'het, Aotrou.

Ar re a zo kam ho zroiou, ha korvigel, eun
tam, en ho c'houstianz, a garfe peurvuia e
ve Doue dall ha bouzar.

Mez Doue a zo lemm he lagad, digor he

ziskouarn, hag hir he vreac'h. Eun dervez,
euz he varadoz, hor galvo da renta kount.
Neuze, ma ne vez eeun ar stern, Doue, d'he
dro, a lavaro deomp: « Va lezit em baradoz,
c'houi, iit abiou, ha choumit er meaz. »

EIL KOUBLAD HA TREGONT.

« Lamit ho zae digant ar veleien, n'int nemet
« tud evel ar re all. »

DISKAN.

Petra! ne vouiec'h ket ann dra-ze c'hoaz?
Ar skritur en deuz lavaret ann dra-ze pell a zo.

Eur medisin, aotrou, a zo e vicher para
ar re all. Ha gousgoude ne vez ket klanv ive
avechou? ne renk ket miga ive d'he dro kouls
hag ar re all?

Eun den, iac'h a viskoaz, n'oar ket petra
eo beza klanv, n'en deus ket kement a druez
ouc'h ar re ho deuz poan.

Mad, evit m'en dije muioc'h a druez ou'h
ar pec'heur, Doue a ro an ursiou da dud dis-
ter, douget d'ar pec'het evel-d'hàn. Evid ke-
len, para, sevel ann dud euz ar pec'het, Doue
en deuz choaset pec'herien geiz evel-d'ho.

Mez ar pezh a sao ar belek dreist ar re all,
eo ar sacramant en denz resevet, ar garg en
deuz a berz Doue.

Kaer ho peuz beza eat er Gambr, oc'h
atao ann aotrou Morvan evel kent, hag eun
den, evel Ian Drotach.

Gousgondear garg ho peuz brema a sao ac'ha-
noc'h dreist ho kenvroiz. Anez, marteze, n'ho
pije ket fistoulet kement evid mont da Baris.

Mad, aotrou, evidoc'h da veza er Gambr, brema pa zeuz great kouez ha kibel var ho krez, ma ve lamet ho liviten diganeoc'h, petra ve kavet a zindan?

Kig hag eskern evel ar re all; eun tam tremp ha boued d'ar prenved, maioc'h pe nebeutoc'h, evel ar re all ive.

Abaoue m'oc'h eat da Baris, poulzet euz diou askel deoc'h, aotrou Morvan? savet euz plu ouzoc'h ho tivesker?

Daou c'her diveza ann Aotrou.

KENTA GER.

« Va ger a zo krenn. »

DISKAN.

Ia, Aotrou, ha druz eun tamik ! Krenn eo ho ker, ha ne ket souez ; n'euz ket izomm da veza pell evid resti eur guden. Pelloc'h e vezeur oc'h he diresti.

EIL GER.

« Lennit dizamant, n'euz gaou ebet ama. »

DISKAN.

En ho kinou, Aotrou, n'euz gaou ebet ken ; nan, laosket int ganeoc'h er meaz da redet.

En ho leor, avad. her gulet hon euz, ez euz meur a hini da baka. Kement a zo anezho, Aotrou, ma ve red deoc'h ho c'hraouia a nevez, ho peffe poan oc'h ho c'has d'ann traon, hag e ve bec'hiet ho stomak.

Ha brema, Aotrou, ken a vezo ar veach kenta.

MAB EUN TROUC'HER BUZUK.